

Nous avons fait examiner un manuscrit breton qui porte ce titre :

GUERSIOU NEVEZ gret gand daou Veleg euz a Escopti Kemper.

Sur le rapport favorable de M. l'Examineur, nous en permettons l'impression.

A Quimper, le 23 janvier 1851.



† J^b M.,
Evêque de Quimper.

Par Mgr. l'Evêque :

ÉVRARD,
Prêtre Secrétaire.


GUERSIOU NEVEZ

GRET

GAND DAOU VELEG EUS A ESCOPTI

KEMPER.

1851.



E KEMPER,

**EUS AN IMPRIMERI E. BLOT, IMPRIMER AN AUTROU'N
ESCOPI.**

AVISOU D'AL LENNER.

P'en em gav eur G dirag un E pe dirag un I, hinien-nou a laka un U etre ar G hag an E pe an I, evelhen : *guened, guinidic*, etc.; re all a laka un H, evelhen : *ghened, ghinidic*. Hogen an draze n'eo mad nemed da zieza al lennerien. Ar guella eo scriva : *gened, ginidic*, etc. Racc-se el leoric-man ar c'homzou e pere a zo eur G bennac ne dleont morse beza lavaret evel p'ave eur J bennag eno.

Ar Guersou a zo var don *Santez Mari*, a heller cana ivez var don *Kelven*, var don *Guerz an tud Manner*, var don *Diskennomp oll a spered en ifern da velleh...*, var an ton gallec *Seigneur, Dieu de clémence*, etc., etc.



KENTA LEORIK.

EVIT BENEDIKSION AR ZACRAMANT.

Ton : *La petite Mendiante.*

Mil bennoz deoc'h, Salver benniget,
Epad an oll eternite,
Da veza ganomp ama chomet,
Dre eur burzud a garante.
Braz, braz meurbed eo hon ezomou,
E mil fesoun oump tourmantet;
C'hui hepken, ô Roue an envou,
A ell ober hon euredet.

Euz ar bed ar joayou milliget
O deuz tromplet hor c'halonou;
Evel un huve int tremenet,
Var o lerc'h neuz nemet poaniou;
Deut, midicin leun a vadelez,
Deut da barea hor gouliou,
Ha, dre ar chalm euz ho santelez,
Grit deomp kasat an oll visou.

Rentit ac'hanomp victoriuz
Euz malis hon enehourien:
Roit deomp oll eur galon kourachuz
Evit heulya mad ho lezen;
E harz ho treid brema daoulinet,
Ni a c'houlén oll ho pennoz,
Evit ho servicha gand aket
Ha mont un deiz d'ho paradoz.

Amen.



VAR AR MEMEZ SUJED.

Ton : Combien j'ai douce souvenance.

Guir zoursen euz ar joayou pura ,
Euz ar garantez ar skuer kaera ,
Evidomp bemdez 'nem offret
En templ-ma ,
Ha varnomp ho krasou a red
Bepred.

O va Jezuz , ra zeuin-me bemdez
Da respont da ger braz madelez ,
O veza deoc'h en oll fidel
Hep paouez ,
Ha kent eget ho tilezel
Mervel.

Gand joa vraz hag hep kontraign ebet ,
Me zelaou an iliz , ho pried ;
A galon e kredan dezi
Hep morc'hed :
Deut , mæstr divin , deut da greski
Ma fei.

Va Zalver , dre ho kras kennerzet ,
D'ar mad mar choman fidel bepred ,
Ezoun sur da vont un devez
D'ho kulet ;
Neuze mui a dristidiguez
Jamez.

Evidoc'h , ma Jezuz , e karan
Ma nessa , evel doun ma unan ;
Mès c'hui , dreist va buhe memez ,
A garan ;
Bezit eta va c'harantez
Bemdez.

Brema divar an oter , ho tron ,
Roit deomp oll ho penediksion ;

Grit ma karimp hoc'h aviel
A galon ,
Ha ma vimp deoc'h , bete mervel ,
Fidel.

Amen.

VAR AR MEMEZ SUJED.

Ton : Selaouit gand joa , etc.

M'hoc'h ador , va Doue ,
E zacamand an Oter ;
Ennan ho karante
A so braz en hor c'hever ;
Hoc'h anaout a reomp
Evit hor mæstr souveren ,
Ha deoc'h oll e voestlomp
Hor c'halon evit biken.

Perak , ô va Doue ,
N'ellomp-ni ket ho karet ,
Evel m'ho kar , en êe ,
An oll zent hag an elet ?
Plijout d'ho majeste ,
E pep lec'h hag e pep tra ,
Setu euz hon ene
Ar vœu , an desir brasa.

Deoc'h , myster adorabl
Demeuz hor relijion ,
Un amand enorabl
A reomp , a vir galon ,
Evit ar pec'hejou
Hon deuz , siouaz , kommettet ,
E treid hoc'h oterion
O veza het direspet.

Pardounit , ni ho ped ,
Pardounit , ô va Jezuz ,
D'ar bobl oc'h euz prenet
Gand hoc'h oll goad prisiuz ;

Sellit euz hon daelou,
Hag uzit euz ho toudser,
Ankouait hon oll grimou,
Ha dalc'hit var ho koler.

Pardon ta, va Doue,
Evit ar sakrilejou,
Pardon ta, va Doue,
Evit an oll outrachou
Gret deoc'h, er barrez-ma,
Ganomp-ni, ho pugale,
daoulinet oll brema
Ni suppli ho trugare.

Ni ho servicherien
A c'houlou, ô va Doue,
Brema dre hor peden,
Ho pennoz var hon ene;
Hor rentit oll fidel
Da ober ho polonte,
Ha grit deomp oll mervel,
Leuz a dan ho karante.

Amen.

VAR AR MEMEZ SUJED.

Ton : Adoromp oll.

O zacramand, ô myster a garantez,
Ennoc'h ema va Jezuz, va gair buhez;
Ennoc'h ema va nerz, va c'honsolasion,
En oll boanion a zeu da droubli va c'halon.

Evidomp-ni, va Jezuz, oc'h bet ganet,
Evidomp-ni, er bed-ma, oc'h euz bevet;
Evidomp oc'h euz roet ho koad hag ho puhe,
Evidomp e chomet var an oter noz-de.

Daoulinet oll, e harz treid ho majeste,
Ni a c'houlou ho pennoz var hon ene,
Evit galloud beva, bepred en ho tonjanz,
Ha jouissa un deiz, en eê euz ho prezanz.

Goude ar Venediksion.

Penoz galloud ho trugarekât parfet
Euz ar vennoz oc'h euz varnomp-ni skuilhet;
Ah! ni a voestla deoc'h hor c'halon, hon ene,
Renit-ta varnezo hag en noz hag en de.

Amen.

VAR AR MEMEZ SUJED.

Ton : Santez Mari.

O Roue braz an envou, c'hui ra hon euredet,
O chom en hon ilizou, er zakramand kuzet;
E touez tud reuzeudik, ô burzud ar brasa!
E lezit ho korf, ho koad, evit dont d'hor maga.

Ho pennoz domp, ô Jezuz, ho pennoz, ni ho ped;
Dre ho nerz oll gallouduz, hon diffennit bepred
Er brezel rust ha kruel a ra domp, hep hean,
Ar c'hig, ar bed milliget a-unan gand Satan.

Deoc'h bepred, ô va Jezuz, gret deomp beza fidel,
Ha gand eur galon joanz heulya hoc'h aviel,
Evit galloud un devez monet oll da repoz,
Gand ar zent hag an eled da c'hloar ar baradoz.

Amen.

VAR AR MEMEZ SUJED.

Ton : Me ho salud, Stereden vor, pe An Actou.

M'hoc'h ador, Jezuz, ma Zalver,
Er zakramand euz an Oter
Pini oc'h euz instituet,
Evit chom ganeomp bepred.

En noz kent ma voac'h trahisset,
Ha d'ar groaz evidomp barnet,
E sonjac'h roi d'ho pugale
Ar merk kaer-ma a garante.

Ho korf, ho koad hag hoc'h ene,
Ho kras hag ho tivinite.
A roit ama d'ho tiskibien,
Da drec'hi o adversourien.

Roit deomp, Jezuz, ni ho suppli,
Ar c'hras d'alloud hoc'h enori,
Gand feiz, respet, humilite,
E sacramand ho karante.

Roit deomp, euz an oter ho tron,
Brema ho penediksion,
Evit ma vezimp deoc'h fidel
Euz a vrema bete mervel.

Amen.

VAR ZAKRAMAND AN OTER.

Ton : L'encens des fleurs.

Peger kaer eo, Jezuz, ho tabernaclou!
Piou ell kompren ar joa hag an dousder
A gav bemdez, e kreiz o brasa poanion,
An dud ho ped, e harz treid hoc'h oter,
O bara divin,
O ma Zalver,
C'hui ra bepred din
Santout eur guir dousder.

O va Zalver, peger dous eo ho lezen!
Peger zantel, peger pur ho chalmou!
Ho joayou a zo dreist ar joayou monden;
Dous oc'h ama, dousoc'h c'hoaz en envou.
O bara divin, etc.

Rezolvei oun, deoc'h bepred e vin fidel:
Ma nijadur vo heulya ho lezen.
Ya, Jezuz, guelloc'h eo ganen mervel
Eget biken hoc'h abandoni ken.
O bara divin, etc.

Evit kaerât ha sanctifia ma ene,

Mestr ar bed oll a briz disken enni;
O va Jezuz, va zenzor ha va buhe,
Pebez eur-vad eo din ho posedi!
O bara divin, etc.

O va Doue! penoz oc'h eus-hu prizet
Kuitât an ee, palez ho majesté,
Evit disken en eur galon ker sklaset.
Hag en em roi d'eur paour eveldon-me!
O bara divin, etc.

Er momet-ma, va Jezuz, me hoc'h ador,
Gand guir respet ha guir devotion;
Var ho comzou, m'ho kred ferm, ma redemptor,
Ha d'er zouten dre ar maro prest oun,
O bara divin, etc.

Mil bennoz deoc'h, ô va Zalver, va Jezus,
Evit ker braz merkou a garante!
Ho kalon din prestit, sperejou euzuz,
Evit karet da viken va Doue.
O bara divin, etc.

Amen.

VAR AR MEMEZ SUJED.

Goude ar Gommunion.

Pegen euzuz oun-me!
Kavet 'meuz va muya karet;
Pegen euzuz oun-me!
Kaouet Roue an ee:
Ya, ennon eo diskenmet;
Oh! burzud a garante!
M'ho talc'h va muya karet,
Pegen euzuz oun-me!

Bez ma ene,
Leun a garante
Evit Jezuz,
Da dad karantezuz;
Mil bennoz ta d'am Zalver,
Mil meuleudi d'am mestr dous ha tener.

Pebez gras evidon !
Penoz ! ma Doue am bizit !
Pebez gras evidon !
Kaout Jezuz em c'halon !
Me den ingrât, den hep dellid,
Ha dign a zaonasion.
Penoz ! ma Doue am bizit !
Pebez gras evidon !
Bez-ma ene, etc.

Petra a so dousoc'h !
Ma Doue, ma Zalver, ma zad,
Petra a so dousoc'h
Eget beza tout deoc'h ?
Mil guez euruz, mestr dous ha mad,
Ar re en em ro oll deoc'h !
Posedi a ran ma zad !
Petra a so dousoc'h ?
Bez-ma ene, etc.

Oh ! pebez eürusted !
Posedi Jezuz em c'halon !
Oh ! pebez eürusted !
Kaout ennon mestr ar hed !
E vajeste a guz ouzon ;
Mës d'e gomzou me a gred ;
Jezuz a so em c'halon,
Oh ! pebez eürusted !
Bez-ma ene, etc.

Me ho kar, ma Jezuz,
Euz a oll c'halloud ma c'halon,
Me ho kar, ma Jezuz,
O mignon ken dudiuz !
N'ho kuitain ken enep feson
Evit heul ar hed trompluz :
Euz a oll nerz ma c'halon,
Me ho kar, ma Jezuz,
Bez-ma ene, etc.

Ho meuli ne allin,
Jezuz, evel ma veritet ;
Ho meuli ne allin

Euz ar c'hras a ret din ;
Ra viot gand an oll meulet,
E pep amser hac hep fin ;
Nan, evel ma veritet,
Ho meuli ne allin.
Bez-ma ene, etc.

Ah ! comzit evidon
D'am mestr divin, Guerc'hez-Vari ;
Ah ! comzit evidon,
Prestit din ho kalon,
Ha me c'hlorifio ganti
Ma Roue, gand devotion.
Ah ! comzit, Guerc'hes-Vari,
Ah ! comzit evidon.
Bez-ma ene, etc.

Renit, mestr souveren,
Brema var ma skianchou ;
Renit, mestr souveren,
Me na zebadin ken ;
Pardonit ma disoursiou,
Renons ran dezo a-grèn ;
Bepred var ma skianchou
Renit, mestr souveren.
Bez-ma ene, etc.

Amen.

EVIT AR GOMMUNION.

(Troet euz a vrezonég Guened e brezonég Kerne).

O na hir eo an noz ! ah ! peur e teui an de ?
Ma zin da zigemer Jezuz, ma c'haranté.
O na hir eo an noz, etc.

Dihun, sao 'ta, ma c'horf, deomp da gavout Jezuz ;
Me glev, ouz ma guele, e vouez karantez.
Dihun, sao 'ta, ma c'horf.

Peur e vin-me arru ! ô hent, na hir oud-e !
Var lein ho tiouaskel, eled, ma dougit-me !
Peur e vin-me arru.

Digor, ô ma c'halon, digor d'ar garante;
Guclet a ran erfin palez kaer ma Doue.

Digor, ô ma c'halon.

O iliz benniget, digor pelloc'h, digor,
Ma ellin mont da gaout ma Jezuz, ma zenzor!
O iliz benniget.

Oc'h antren en ho ti, o mestr braz euz ar bed,
M'ho salud, m'hoc'h ador a gorf hag a speret.
Oc'h antren en ho ti, etc.

O sperejou euruz, oll zent ha sentezed,
Zo en dro d'am Doue, m'ho salud gand resped,
O sperejou euruz.

O tabernakl santel, digor, digor difre
Ma velin ma Jezuz, ma velin ma Doue!
O tabernakl santel.

Dre ar feiz, m'hoc'h anaff, Jezuz, ma c'harante,
Evit ma Redemptor hag evit ma Doue.
Dre ar feiz.

Dispozit ma c'halon d'ho reseco, ma Doue;
Roit din feiz, esperanz, kreskit ma c'harante.
Dizpozit ma c'halon.

Deut eta, ma oll vad, deut, deut pront em c'halon,
Hag enni, evit mad, diazezit ho tron.
Deut eta, ma oll vad.

Goude ar Gommunion.

M'ho talc'h, ô ma Jezuz, birviken n'ho loskin;
Mignon mad ha fidel, dalc'h-mad c'hui a garin.
M'ho talc'h, ô ma Jezuz.

Pebez dousder, Jezuz, ô pebez karante!
Pa zoc'h ker dous ama, peira vec'h-u en cê!
Pebez dousder, Jezuz.

Skoazel din, skoazel din, mont a ran da gouea!
N'ellan mui en em zerc'hel, ne badan gand ar joa!
Skoazel din.

O eurusa momet! e pelec'h e maon-me?
Koll a ran ma c'halon, nijal a ra d'an cê!
O eurusa momet.

Ma Jezuz, a zo din, ema oll em c'halon;
Ne ket me eo a vev, en eo a vev ennon.
Ma Jezuz a zo din.

En em daol va c'halon, kousk var galon Jezuz;
Eno te a gavo eur repoz dudiu.
En em daol va c'halon.

Deut, poblyou an douar, deut, sperejou euruz,
Deut da velet ar vad a ra din va Jezuz.
Deut, poblyou an douar.

O Mari! ma c'halon a servich da balez
D'ar map hoc'h euz douget etre ho taou gostez.
O Mari! ma c'halon.

Pellait oll, sonjou væn, pellait euz va speret;
Va lezit gand Jezuz, gand va muya karet.
Pellait oll, sonjou væn.

Deut ganen, va Jezuz, deomp hon daou a goste
D'en em attreteni hon unan noz ha de.
Deut ganen, va Jezuz.

Comsit oc'h ma c'halon, Jezuz, ma c'harante,
Ha deskit ac'hanon d'ober ho polante.
Comsit oc'h ma c'halon.

Grit, Jezuz, ne glaskin, ne garin nemedoc'h,
Grit ma vo e pep lec'h ma oll sonjou ennoc'h.
Grit, Jezuz.

Kenavo, ma Jezuz, ma c'horf a ya d'ar ger;
Mes ma c'halon a chom ganeoc'h var an oter.
Kenavo, ma Jezuz.

VAR AN DEZIR DA VEZA GAND JEZUZ EN EE.

Ton : *Du séjour de la gloire, pe Divin Cœur de Marie.*

Pel diouz ma Zalver Jezuz
Va joa, va c'harante,
Ez oun trist, ankeniuz,
Hag en noz hag en de.
It, ô ma el benniget,

Ha lavaret dezan
Eo ma ene glac'haret
Dre ne m'oun ket gantan.

Ya, m'em euz kals hirvoud,
Kals dezir, kals hirnez,
Defot n'allan erruout
Gantan en e balez.

It, ô ma el benniget, etc.

Ma c'halon er c'hilask ato,
Gand kals muyoc'h a brez,
Eget un den skuiz-maro,
Ar fin euz e zezev.

It, ô ma el benniget, etc.

An durzunel goelvanuz
A hirvoud noz-a-de;
Evel-se var lerc'h Jezuz
E hirvoudan bemde.

It, ô ma el benniget, etc.

Ya, en a zeziran
Evit pried divin;
Dreist oll vadou ar bed-man
Bepred en istimin.

It, ô ma el benniget, etc.

Pellait, joayou monden,
N'en doc'h nemet c'huerder;
Rag ar bonheur souveren
Eo Jezuz, ma Zalver.

It, ô ma el benniget, etc.

Plijet gant e garante
Entani ma c'halon,
Ha digemer ma ene
E peoc'h, o joa Sion.

It, ô ma el benniget, etc.

Bete p'eur e c'hirvoudin
Var lerc'h an deiz kaër-ze,
E pehini e velin
Jezuz, ma c'harante.

It, ô ma el benniget, etc.

Da c'hortoz m'er c'hontemplin,

Er banket eternal,
Gand dudi en recevin
Er zacramand santel.
It, ô ma el benniget, etc.

EURUSTED AN ENE FERVANT.

Ton : Godtez, âme fervente.

Tanvair, eneoù fidel,
Tanvair an dousder
A gav an eneoù santel
E servich o c'hrouer;
Mil guech euz an ene
A so hepred fervant,
Reseo ra digant Doue
Grason braz bep istant.

Ar fervor so guir syell
Ar vertuzioù barfet,
Hag euz ar gloar eternal
Eo eur merk assuret.
Mil guech euz, etc.

Dre enni eur seiz kreoc'h
A vlein hor c'halonon
Hag eur sklerijen vrasoc'h
A reiz hon oberou.
Mil guech euz, etc.

Dre enni an esperanz
A hirvoud deiz ha noz,
Hag a danva dre avañz
Joayou ar baradoz.
Mil guech euz, etc.

Dre enni a heur-da-heur
E kresk, en hon ene,
Ar flamou santel ha pur
Euz ar guir garante.
Mil guech euz, etc.

E vertuz oll gallouduz
Hor goarantiz bepred
Enep ar chalmon trompluz
Euz a joayou ar bed.

Mil guech euruz, etc.

Gand e sikour, hon ene
A gendalc'h flam bepred
Ar vertuz a burete,
Gand Doue ker karet.

Mil guech euruz, etc.

Da un ene glac'haret
E rend dous an daelou;
Ha da un ene poaniet
E rend dous ar poaniou.

Mil guech euruz, etc.

An hini a so fidel
Da zelaou mad e mouez,
En deuz eur gourach santel,
E pep kontrolyez.

Mil guech euruz, etc.

Ar verzerenti memez
A zouder so karget,
Evit ar galon a vez
A fervor entanet.

Mil guech euruz, etc.

Oc'h e c'huzulou santel
An hini a zento,
Tenzoriou celestiel
Anezo a denno.

Mil guech euruz, etc.

Hi eo a brepar bemde
Ar gurunen skoduz
A vo, en eternite,
Gloar mignoned Jezuz.

Mil guech euruz, etc.

Dr' enni un huanaden,
Eur herad a zaelou
A blich d'ar mestr souveren,

A c'hounevez e c'hrasou.
Mil guech euruz, etc.

An ene a so fervant
A danva, noz ha de,
Ar peoc'h, ar gontantamant
A ro servich Doue.

Mil guech euruz, etc.

Mes, hep fervor, an ene
A zo dinerz mearbed,
Hag e oll gened ive
A vo souden kollet.

Mil guech euruz, etc.

Amen.

EVIT DIGORI RETRET AR YUGALE.

Ton : Selaouit gand joa.

Ar c'hleyer zo sonet,
Pebez kelou, bugale!
D'ho kervel d'ar retreat
Da zelaou comzou Doue;
Setu 'ta an deizioù
Ganoc'h pel-zo gortozet,
Souden ho tezirou
A vezo peur gontantet.

Mil guech oc'h euz torret
Lezen an otrou Doue;
Mil guech, gand ar pec'hiet,
Oc'h euz soiret hoc'h ene;
Deut eta d'ar retreat,
Pa zeu Doue d'ho kervel,
Hag e viot rentet
Adarre pur ha santel.

Evel ar mab prodig,
Ho Tad oc'h euz kuiteet:
Evel ar mab prodig,

Ho follentez komprenet;
Ah! distroit ouz Doue,
Ho klask, ho kervel a ra;
Pelloc'h e garante
Heanit d'ankennya.

Grit eur zell a druez,
Ni ho ped, Drindet santel,
Ouz ho pugale gez;
Rag deoc'h int bet difidel;
O stad so truezus,
Ho koler a veritont;
Mes eur zell favoruz
Ouzoc'h oll a c'houlennont.

Patrom euz ar barrez,
Otrou Sant Per benniget
Mari, mam a druez,
Ha c'hui oll, zent hag eled,
Pedit, pedit brema
Evit ho pugaligon:
D'ober ar retret ma
Dezo goulennit grasou.

(*Ar memez kouplad en eur mod all.*)

O Guerc'hez gallouduz,
Patronez euz hor parrez, (*)
C'hui sperejou euruz
Gand Doue en e balez,
Pedit, pedit brema
Pedit vit ho pugale;
D'ober ar retret-ma
Sikour dezo 'n han Doue.

Tadou ha mamou ker,
N'ankouait ket ho pugale,
Er spas euz eun amser
Ker prisiuz d'o ene;
Mes, dre ho pedennou,
Bemdez epad ar retret,
Suppliit an envou,
Evit m'er gaint oll parfet.

(*) Pe : *Deomp oll quir alvokadez.*

Ra blijo gand Doue
Ne ve ket en ho touez,
Mestr na mestrerez ive,
Ker difeiz, ker didruez,
'Vit réuz d'eur bugel
So en o zervich bemde
Ar blijadur zantel
Da glevet comsou Doue.

Ouzoc'h oll bugale,
Eur c'hras a c'houlomp ama;
En iliz, ty Doue,
Bezit devot er sun-ma,
Bezit ato parfet,
Ha da bep instruction
Prestit mad ho speret,
Oc'h ober attansion.

Eun Tad trugarezuz,
Ho Toue hag oc'h otrou,
A gennik deoc'h joauz
E galon hag e c'hrasou;
Mes evit o roi deoc'h,
Ententit mad, bugale,
En a c'houlenn ouzoc'h
M'en em zikourot ive.

Rag anez kement-se,
Siousas, grasou ar retret
Evidoc'h, bugale,
A-dra-sur a ve kollet;
Rag e zonezonou
Doue na skuil ordinal,
Nemet er c'halonou
A hirvoud oc'h o gedal.

Klevit, bugaligon,
Braz a ve hor poan speret,
Ma teuffac'h, dre c'hoariou,
Da goll froez ar retret;
Espernit, ni ho ped,
Abers an Otrou Doue,
Eur boan ker diremed
D'ar re a gar hoc'h ene.

Ra blijō gand Jezuz,
Ne ve ket, en ho touez,
Hini ker maleuruz
D'ober seurt tristidigez
Domp ha d'ar velezen
Hon deuz ama reketet,
D'oc'h instrui, d'ho kelen
Ha d'ho lemel a bec'het.

Klaskit ho pec'hejou,
Ha klaskit-o gand aket;
Pedit sterd an envou
Da roi deoc'h glac'har parfet;
Oll fotou ho puhe
Kovesait gand lealdet,
Hag e viot neuze
Gand ho Toue unanet.

Klevet oc'h euz brema
Avizou mad ho pastor;
En ho kalv er zun-ma
Da reseo ho Redemptor.
Bezit oll resolvet
Da veza dezo fidel,
Hag ez oc'h assuret
D'ober eur retret santel.

Amen.

EVIT ECHUI RETRET AR VUGALE.

Menez ton.

Setu, bugaligou,
Ar zizua-ma tremenet;
Eurusa devezion
d'an nep en deuz profitet!
Mes ive malheuruz
D'an nep n'euz ket selaouet.
Ar vouez trugarezuz
Euz e Zalver beniget.

Mes ar barfeteri,

Hon deuz ennoc'h remerket,
A ra deomp da gredi
Oc'h euz gret mad ho retret;
Klevit, a herz Jezuz,
Ar voyen da gonservi
An tenzor prisiuz
Oc'h euz recevet enni.

Karit kals ar beden,
Pedit bemde, bugale;
Setu eur guir voyen
Da gaout grasou Doue;
Anez ne hellot ket
Euz an droug en em ziffen,
Anez ne hellot ket
Pel er vertuz kendalc'hen.

Oc'h ar zakramanchou
Bep mis tostait, mar gallet;
Rag, demenz ar grasou
Int ar zoursen asuret.
An nep a glask erfad
Silvidigez e ene
A gar lies tostât
Oc'h feunteunyou ar vuhe.

Dalc'hit evit Jezuz,
E sakramant an Oter,
Eur garantez paduz,
Eun devosion tener;
Hon nerz eo, hor buhe
Hag hor c'honsolation
Er poaniou zeu bemde
D'ankennya hor c'halon.

Bezit ive devot
Da Rouanez an envou;
Drei-zi ec'h obtenot
An nerzusa sikourou,
Evit avañz er mad
Ha kreski er zantelezh
Ha kaout eun issu mad
Evit ho zilvidigez.

Hoc'h el-mad enoret,
En zo eur mignon fidel;
Jamès ar sonch n'ankouet
Demeuz e brezanz santel;
En hoc'h oll ezomou
Goulennit e asistanz;
Tec'hit enez ar visou
Rag int meurbed en offanz.

D'ar mad, d'ar santelez
Sonjit d'en em roi abred,
O tioual gand evez
Da gemer pleg fall ebéd;
Rag diffin ar vuez
Demeuz e c'hommansamant,
A lavar ar furnez,
Gozik bepred a zepant.

Epad hoc'h oll vuez,
Klevit mad, bugaligou,
Diouallit gand evez
Oc'h goal gompagneunezou;
Rag, Sionaz, kaoz e vent
Euz ho malheur eternal,
Pa zint bet diagent
Euz hini kals tud santel.

Mar klask ar bec'herien
Ho tenna d'o ehatou
Ha da drouk ho tougen
Dre feson pe dre gomzon;
Pellait ha pellait krenn,
En despet d'o goaperez,
Hag, evel ar vosen,
Kasait o c'hompagneunez.

D'ho tadou, d'ho mamou
Karantez bepret douget
En o oll ezomou
Gand aket o zikouret;
Gand joa out-o sentit,
Doue deoc'h er gourc'hemen;
Morse na rezonit,
Kement-ze ve disordren.

Setu ar c'hentellyou
Hon deuz nesaser kredet
Roi deoc'h, bugaligou,
Hirio e fin ar retret;
Bezit dezo fidel,
Bemdez epad ho puhe,
Hag e vevot santel
Hag agreabl da Zoue

Kelennadurez d'an tadou ha d'ar mamou.

Tadou, mamou ive
Senchit pelloc'h a feson
Vardro ho pugale,
Ni ho suppli a galon;
Ne loskit mui varno
Nep seurt malediksion
Rag Jezuz n'euz dezo
Roet e venediksion.

Digast dezo memor:
Euz an devez solanel
O deuz bet an enor,
Daoust d'o buez difidel,
Da zigemer Jezuz,
Hon Doue, hag hon oiron,
O tra oll burzuduz!
Ebarz en o c'halonou.

Kymiad ar vugale d'ar velezen o deuz sikouret roi ar retret.

Leveromp eur beden,
Etrezomp bugaligou,
Evit ar velezen
O deuz lesi o farrezion,
Evit donet ama,
Da zispozi hon ene
Da receo, er zun-ma,
Hor Zalver hag hon Doue.

Kenavo, belezen,
Brema deoc'h a leveromp,
C'hui so deud d'hor c'helen,
Hor bennoz deoc'h a roomp;

Marteze mui biken
 Er vuez-ma n'ho kuelimp,
 Gouscoude da viken
 Hoc'h avizou a c'heullimp.

Kimyad ar pastor d'ar vugale.

Kenavo deoc'h ive,
 D'am zro, va bugaligou;
 Da Jezuz ha d'an ee
 Adressit ho pedennou,
 Evit ho pastor paour
 Evidoc'h oll ken douget,
 Ma hello ho sikour
 D'erruout er guir euredet.

Amen.

MEULEUDI AN DEN A ZOUJANZ DOUE

PE ALI

DA SERVICHA ERFAD AN OTROU DOUE.

Ton : Vous qui vivez dans les travaux, pe Angelus Pask.

Klevit oll, klevit meuleudi
 An den a zoujanz Doue;
 Hag deut pelloc'h, hep digari,
 Da zenveza e vuhe;
 Rag poulz hag ali eo d'an oll
 Da heulia lezen Doue.

De zever e kenver Doue
 Eo fidel e pep amzer;
 Ar maro kent a andurfe
 Eget mankout d'e grouer;
 Goestla ra dezan e galon,
 E speret, e oll vuhe.

Mar d'eo penvidig ne stag ket
 E galon euz e vadou;
 D'ar beorien eo digor bepred
 E zor hag e denzorieu;

Soulaji an dud ezomeg
 Eo e zousa dudyou.

E kreiz an eur-vad n'en deo ket
 Rog, morgant, nag ourgotuilluz;
 Er goal fortunyou n'en deo ket
 Jaluz, trist, nag enkreuz;
 Mès e pep stad modest hag humbl
 E vev contant ha joanz.

Roit dezan ar stad a gerot,
 E pep karg, e pep mitcher
 Hag e pep affer er guelot
 Bepred fidel d'he zever;
 Evit laret oll en eur gomz,
 Bepred un el er c'hassot.

Fur eo en e oll oberou,
 En e gomzou dous bepred;
 E pep lec'h e ro exemplou
 A justis, a lealdet;
 Gand an den a zoujanz Doue
 Morse den ne vo tromplet.

Martez' e vo persekutet
 Gand an dud malisiuz;
 An dra-ze alies so bet
 Loden an dud vertuzuz;
 Doue a hermet kement-se
 Evit purat o vertuz.

Den ne gar kalz an den mechant,
 Beva a ra hep mignon;
 Evit e dud eo eun tourmant
 Hag evit e oll ganton;
 E vuhez, pa ve memez ber,
 Hir braz bepred a zeblant.

Mès d'an den mad, d'an den parfet,
 E tezirer mil buez,
 Ha n'eder jamès enouet
 Euz a hirder e vuez;
 Hag anken an oll galonon
 En heuillô ebarz er bez.

Eur vad a vo en e vuhe,
 Eme ar Speret-Santel,
 D'an den en deuz doujanz Doue,
 O veza dezan fidel;
 Ha pa varvo, a vil bennoz
 A vo karget e ene.

Pa zonch en amzer dremenet
 Evel ar fin d'e boaniou;
 Pa zonch en amzer da zonet
 Evel ar mor a joayou
 A ro Jezuz d'an dud o deuz
 E doujanz Doue bevet.

Ar memor euz e bec'hejou
 Ne vourrev ket e galon;
 Effaset en deuz e fotou,
 Dre eur binijen guirion;
 Etre daouarn e Redemptor
 Joauz en em abandon.

Rag se o vervel ne vo ket
 Leun a spount, a remorsiou;
 Mès gant joa e tilez ar bed,
 Evit tremen d'an envou.
 Dous eo mervel d'an den en deuz
 E doujanz Doue bevet.

Sonjomp brema da zenveza
 E œuvrou hag e vuhez,
 Hag oump asuret da danva
 Ar guir laouenidigez
 A heul bepred an dad a vev
 E doujanz Doue bemdez.

Douja an Otrou souverén,
 Miret e c'hourchemennou,
 Eo oll merit, oll gloar an den,
 A lavar ar skrituriou;
 Beva ta, hep doujanz Doue,
 Zo eun drouk braz da bep den.

Ar stad, an habit ne reont ket
 An den a zoujanz Doue;

Mès kals soursi ha kals aket
 Da blijout d'e vajeſte.
 Miret e lezen hag e vec'h
 Eun den a zoujanz Doue.

Amen.

EVIT DEIZ AN NEDELEG.

Me glev duze, er meneou,
 Eun arme a elez joauz,
 O kana, euz o oll mouezion,
 Ar c'hantik-ma ker dudiuz:
 Gloria, gloria in excelsis Deo,
 In excelsis Deo, in excelsis Deo.

Perak ker braz kan en envou?
 Perak ker braz merkou a joa?
 Evit pion ker braz enoriou
 Ha ker braz triomphi en heur-ma?
 Gloria in excelsis Deo, etc.

Evit embann ginivelez
 Jezuz, Redemptor Israël,
 Eo e kan en ær an elez,
 En devez-ma ker solanel.
 Gloria, etc.

Demp da velet oll assemblez
 Ar Zalver keit-zo gortozet,
 Demp da velet gant levenez
 Al lec'h paour en deuz choazet.
 Gloria, etc.

Dija an elet benniget,
 Dre ho muzik melodiuz,
 O deuz desket da dud ar bed
 Kana dezan an hym joauz.
 Gloria, etc.

Kelennet oll, dre o exempl,
 Ni a vezo bepret fidel
 Da gana, Jezuz, en ho templ
 Ho madelezoù eternal.
 Gloria, etc.

Amen.

PEDEN D'AR VERC'HEZ.

(Troet euz a vrezonég Sant-Brick.)

* Ton : *L'encens des fleurs, etc.*

Me ho salud, ô Mari, mam da Zoue,
C'hui, perlezen euz ar gloar eternel,
En em strinka a ran, guir vam a drue,
Ama dirag hoc'h oteriou santel.

Guerc'hez gloriuz,

O ma Itron!

Mam garantezuz;

Renit var ma c'halon.

Me ho salud, ô burzud a garanté,
Deoc'h eo dleet respet ar gristenien;
Goude Jezuz ez oc'h serten hor buhé,
Hon esperanz ha skor ar bec'herien,
Guerc'hez, etc.

Maleuruz omp, adaleg ma omp ganet;
Nag a zaelon a skuil hon daoulagad;
Kollet hon deuz, sionaz, ar guir eursted,
Dre'n abeg da bec'het Adam hon tad.
Guerc'hez, etc.

Hon selaouit, alvokadez galloudeg,
Ha varnomp oll tault eur zell a druez;
Guelet a ret pegement omp dic'hoanteg
Da labourat en hor zilvidigez.
Guerc'hez, etc.

Guerc'hez Vari, leun a deneridigez,
C'hui pehini oc'h euz ganet Jezuz,
Obtenit domp ar c'hras, dre ho madelez,
Ma vimp en ee gant eun deiz euruz.
Guerc'hez, etc.

Amen.

P. R. B. P. St V.

SONGESONOU DEVOT

DA ISPIRA D'AR RE A ZO DARE DA VERVEL.

An dud divar ar mez, goude beza recevet o sakramanchou diveza, ispisial ar re a zo pell euz o bourc'h, a varv, gosig oll, hep kaout den ebet, gonest d'o asista pe d'o zikour, en amser ma vent prest da vervel. Rag-se em euz sonjet ober mad, o lakat el leorik-ma eun neubeud comsouigou, pe santimanchou mad pere a alfer æz da lavaret pe da leun d'an den klan.

Evit reseo a galon vad ar maro.

Ma Doue, me a fell din mervel evit effasi, dre ma maro ha ma foaniou, an oll bec'hejou em euz gret epad va buez.

Me a fell din mervel evit ho kloar hag evit diskeuz deoc'h ma c'harantez, dre an dilez euz ma buez.

Me a fell din mervel evit oboisa d'ho kourc'hemen ha d'an arret a varo oc'h euz douget em enep hag enep an oll dud.

Me a fell din mervel evit mont d'ho kuclet, d'ho posedi, d'ho meuli ha d'ho karet eternalamant en ee.

Me a fell din mervel evit ho trugarekat euz hoc'h oll madoberou em andret.

Me a fell din mervel evit n'hoc'h offansin ken, pa n'eller ket beva hep pec'hi.

Me a fell din mervel, ma Jezuz, rag m'oc'h euz prizet mervel oc'h unan, ha mervel dre garantez evidoc'h, pa zoc'h maro dre garantez evidon.

Santimanchou pe Aktou a feiz.

Me a gred ennoc'h, ma Doue, rag ma oc'h ar virionez memez. Me a gred kement a gred an iliz pehini na gred nemet ar virionez. Kreskit c'hoaz ma feiz.

Aktou a fizianz.

Me a esper ennoc'h, ma Doue, abalamour ma oc'h an drugarez hep muzul. Ma Zalver Jezuz, c'hui na réusot

ket din ar pardon, p'eo guir n'oc'h euz réuset din nag ho koad nag ho puez. Passion Jezuz, c'hui a so ma esperanz; militou Jezuz, c'hui a so ma esperanz; goulou Jezuz, c'hui a so ma esperanz; goad ha maro Jezuz, c'hui a zo ma esperanz. O Jezuz! ho pet truez ouzin; saveteit ac'hanon, c'hui pehini na zilezit morse ar re a esper ennoc'h.

Aktou a garantez.

O ma Doue! me garfe ho karek. Allumit em c'halon an tan euz ho karantez; me ho kar, ô ma Zalver; mes me garfe ho karek muyoc'h. Ya, brema me ho kar, dréist pep tra; me ho kar mui egedon va unan; me ho kar mui eget va buez; kontant oun d'e c'holl dre garantez evidoc'h. Guerc'hez Vari, petit Jezuz evidoun; ma dought oll da Zoue. O mam dous ha mad, me ho kar kals, kals. Me a fell din mont d'ho karek evit birviken er baradoz.

Aktou a gontrision.

Ma Zalver ha ma Jezuz, pardonit din arog ma barn. Ah! va Jezuz, perag ne doun-me ket bet ato fidel deoc'h? N'em euz ken konsolation nemed an hini da alloud c'hoaz repara ma ingratiri. Hoc'h abandonet em euz, disprijet em euz ho kras, ho kollet em euz dre ma faot; pardonit din abalamour da Jezuz; pardonit din dre garantez evit ho map divin. Ar glac'har ar brasa em euz d'ho peza kement offanset. Keuz em euz da gement-se. Me a garfe mervel gand va glac'har. Dre garantez evit Jezuz, ho pet truez ouzin; renonz a ran a grèn d'ar pe-c'het. Pe gals pe neubend e vevin c'hoaz, ma Doue, me fell din ho karek. Evit satisfaksion euz ma fec'hejou, me offr deoc'h ma maro hag an oll boaniou a andurin beteg mervel. Ma Doue, reson oc'h euz d'am punisa; n'em euz gret nemet hoc'h offansi; mes, me ho ped, kastizit ac'hanon er bed-ma ha nan er bed all.

O Mari! mam Doue ha va mam, obtenit din eur guir glac'har, ar pardon hag ar berseveranz.

Aktou a resination.

Ma Doue, setu me ama; dispozit ac'hanon evel ma ketot, ho polontez ra vezo gret ato ha nan va hini-me; me a fell din ar peza a fell deoc'h, me a fell din anduri keit

ha ma plijo ganeoc'h, ha mervel, pa blijo ganeoc'h. Deoc'h ez oun, ma Zalver, hag etre ho taouarn en em daulan. Ya, me luka etre ho taouarn ma ene, ma c'horf, ma buez ha va maro.

Huanadou evit ar Baradoz.

P'eur, ma Doue, ho kuclin-me; gened eternel, p'eur e vezin-me er baradoz evit ho karek, evel ar zent hag an eled? Ah! va Zalver, p'eur e vezin-me er meaz a zanjer d'ho koll? Peur e vouchin-me d'ar goulou oc'h euz anduret evidon?

Santimanhou mad da ispira d'an den klan en eur roi

dezan ar groaz da vouchat dezi.

O ma Jezuz, n'a sellit ket euz ma fec'hejou, mes euz arpez oc'h euz anduret evidon. Kourach, adorit ar groaz hag unisit ho maro gand hini Jezuz o vervel evidomp. O va Jezuz! evit savetei ar bed, evit renta din-me ar vuez oc'h euz anduret eur maro ker kruek; ô va Redemptor, ne gollit ket eun ene pehini so koustet deoc'h kement a zaélou hag a voad!

Arabat eo ober an oll aktou-ma en eur vech da un den klan; mes gaeck lod, gueck lod-al, grit-o aliez, mes neubend seul-vech evit e gonderc'hel, hep e skuiza, e santimanhou a feiz, a fianz, a garantez, a c'blac'har, a soumission da volonte Doue hag a zezir euz ar baradoz.

Pa veler an den klan prest da renta an alanad diveza, e tleer ober an aktou ama varlerc'h, hep hean ha gand eur vouez krevoc'h:

Ma Doue, sikourit ac'hanon. Lezit ac'hanon da vont d'ho karek eternellamant. Ma Jezuz, ma c'harantez, me ho kar, ha keuz em euz ato d'ho peza offanset. Guerc'hez Vari, ma esperanz, saveteit ac'hanon; petit Jezuz evidon. Oh! ma Zalver, saveteit ac'hanon dre ho passion; me ho kar. O Mari! mam dous ha mad, sikourit ac'hanon brema, Sant Joseph, saveteit ac'hanon. Sant Mikel, diffennit ac'hanon. Ma El-Mad, ma sikourit. Ma Faëron, ho pet sonch ac'hanon. Oll Zent euz an ee, petit Doue evidon. Jezuz, Jezuz, Jezuz, Jezuz, Mari, me a ro deoc'h ma c'halon ha ma ene.

Netra guelloc'h eget lavaret alies litanou ar Verc'hez, epad ma ve an den klan en e baston.



EIL LEORIK.

GUERSOU NEVEZ VAR ZAKRAMAND AN OTER.

KENTA GUERS.

Ton : *Santez Mari.*

Deomp d'ar gamb-lid a speret ha guelomp hor Zalver
O roi d'he zaouzec diskibl sakramand an oter;
Bara etre he zaouarn e sav he zaoulagad
Gant joa etrezeg an env, en eur veuli he dad.

O veza stonet he benn e vinnig ar bara,
Hen rann hag hen ro joauz d'ar re a zo ganta,
En eur lavaret dezo : dalit, va mignonet,
Debrit : he-man eo va c'horf evid an oll roet.

Eur c'halir ha guin ennan a gemer goude-ze
Ha, ractal m'en deuz meulet he dad ker adarre,
Her binnig hag a lavar : dalit, va diskibien,
Evit : he-man eo va goad, ranson ar bec'herien.

Evelse en deuz chenchet dre nerz he gomz divin
En he gorf hag en he voad ar bara hag ar guin;
Evelse breman e ra dre deod ar veleien
Bemdez ar memez burzud epad an oferen.

EIL GUERS.

Ton : *Santez Mari.*

Hep dilezel an envou, Jezus, guir Bastor-mad,
E-teuzot var an douar da glasq an dud divad;
Ha goude trec'h d'ar maro e pignzot en envou
Hep kuitaat ho pugale el lec'h-man a zaelou.

Rag, en eur roi d'an iliz sakramand an oter,
E rozot d'ho ministret ar galloud da ober,

Dre nerz ho comzon zantel ha bete fin ar bed,
Ar burzud caër a reac'h eyit ho mignonet.

Ne d-eo ket ar vech kenta hoc'h euz, o va Jezus,
Roet d'ho servicherien eur galloud burzuduz;
Aliez dre ho peli o deuz gret burzudou;
Er scritur zacr her c'hayomp var galz a follennou.

E leiz a dud a velaz Moysez ho mignon
Oc'h ober meur a vurzud e siadou Pharaon
Evit lakaat ar prinz-ze, spontet oc'h ho gaelet
Da leusket euz an Aegypt ho pobl muia caret.

Gaelet a reaz ar prinz dour he roantelez
Troet e goad dre c'halloud ar profet Moysez;
Epad seiz devez goude e pep corn he siadou
E lec'h dour goad a rede euz an oll mammennou.

Var gourc'hemmen Moysez ar mor ruz a deg'haz,
Etre daou gleun dour zac'het un hent meur a reaz;
Ha goude beza lezet bobl Doue da dremen,
Gant counnar e tiredaz var an enebourien.

Gand he vaz var eur garrec Moysez a scoaz
Ha dour anezi ractal gand her a ziredaz;
Ouspen daou villion den ha calz anevaled
Gand an dour burzuduz-ze a doraz ho zec'hed.

Peger caer e oa guechall gaelet ar burzudou
A rea ho ministret dre ho cras, va otrou!
Hogen mil guech eo caeroc'h gaelet en oferen
Ar burzud a rit brema dre deod ar veleien.

Guechall ouz ho pugale o deuz huan sentet
An heol, ar mor, ar rec'hier, ar vosen, ar lec'hed...
Hogen eur burzud a zo dreist ar burzudou-se;
En ofern ouz ar beleg e sentit, va Doue.

Bemdez da gomz ar beleg e tigor an envou,
E teuit var an oter gand hoc'h oll tenzorien
Evit roi d'ho pugale ar bara pemdezic
Hag evit ma vo meulet ho Tad-oll c'halloudec.



TREDE GUERS.

JEZUZ A ZO E GUIRIONEZ E SAKRAMAND
AN OTER.

Ton : *Santez Mari.*

Var ho comzou benniget e credan, va Zalver.
E chomit dre garantez ganomp var an oter;
Varni 'vel Doue ha den emoc'h e guirionez :
Ho corf, ho coad, hoc'h ene zo gand ho touelez.

P'hoc'h euz bet hen discleriet guechall d'hoc'h ebestel
Ha p'hen discleriet bemdez dre hoc'h iliz santel,
Perag e felle d'an den compren ar mister-ze?
He skiant a dle tevel, pa gomzit, va Doue.

Hon Doue leun a skiant ha leun a vadelez
Biscoaz n'en deuz lavaret nemet ar virionez;
Hon Doue oll-c'halloudec a ra e peb amzer
En env ha var an douar ar peza gar ober.

Evel m'hoc'h euz, va Jezus, tennet euz a netra
An env, ar mor, an douar hag en eur ger pep tra,
Evelse var an oter ho torn oll-c'hallouduz
A ro d'omp e peb amzer eur bara burzuduz.

Var goulén ho mam zantel hoc'h euz en un euret
Evit plijadur ar c'horf an dour e guin troet,
Evelse guin ba bara a cheuchit, va Doue,
En ho corf hag en ho coad evit mad an ene.

Daou beskig ha pemp bara ho torn a vennigaz;
Ganto en eur ho meuli, pemp mil den a goaniaz
hag ho tiskibien zantel a zeuz goude-ze
Da garga daouzec paner gand ar peza chome.

Mez dre eur burzud brasoc'h da viken e pado
Ar banked caer a roit abaoue ho maro;
Un niver braz a veler dre bevar c'horn ar bed
O vont bemdez da zibri ouz ho tol benniget.

Ho corf, ho coad, hoc'h ene, ho craz, ho touelez
A roit da beb-unan gant calz a vadelez,

Ha pa chom en tabernacl hostiou zacr goude-ze.
C'houi a ve c'hoaz oll ennan coulz hag e gloar an ee.

Va Jezus, en eur gredi em'oc'h var an oter
N'ameuz ket aoun da fazia, p'her c'hredan var ho ker,
Mez heb an oberiou mad ar feiz a ve maro,
Va likit ta d'ho caret ha va feiz a vo beo.

PEVARE GUERS.

VAR AR SPESOU ZANTEL.

Ton : *Santez Mari.*

Va Jezus, pion a scuizfe e kichen an oter
O velet ho madelez, ho furnez, ho tousder?
Ar spesou zantel zoken a ro meur a gentel
D'ar re a zeu da vedoc'h, pa brizit ho gervel.

Er spes sacr euz a vara gret gant meur a c'hreunen,
E lec'h calz greun ne velan nemet un tam hepken;
Ne velan c'hoaz ken nebeud er spes sacr euz a vin
Nemet eur banne hepken e lec'h calz greun rezin.

Evelse, ar gristenien, p'o deuz communiet,
Ne dlefant mui ken nebeud beza dizunvanet,
Mez en em garet ato evel pa n'o defe
Nemet ar memez calon hag ar memez ene.

Didan ar spesou zantel hoc'h euz en em guzet,
Evit ma c'avimp esoc'h tostaat ouz ho panket :
Heb heuz e tebromp ho corf hag ec'h evomp ho coad
P'ave tromplet hor genou coulz hag hon daoulagad.

Pa vevec'h var an douar, er boan, er baourentez
Ne guzec'h da viana nemet ho touelez;
Ober a rezot zoken burzudou hep niver,
Hogen ama ne velan nemet spesou dister.

Didan ar spesou dister e cavan couscoude
Ho corf sacr, ho touelez, ho coad hag hoc'h ene;
Epad ma chomit zoken en hosti benniget,
C'houi a zo galloudekoc'h eged an oll brinsed.

Ho ren var an oteriou eo ren ar garantez;

Ar merkou euz ho calloud a lezit a gostez
Evit ma tostaitip ouzoc'h, ar fizianz er galon,
Evel ma'z er da gavout un tad pe eur mignon.

Pa zellan ouz ar spesou, e soujan, va Zalver.
Er mad a ra d'an ene sakramant an oter;
An nerz, pa zebrer bara, a red en izili;
Pa evez guin, er galon e tisken an dudi.

Evelse pa ve maget gand ho corf hag ho coad
An ene cren ha laouen a gar ober ar mad;
Mez, p'ez a pell diouzoc'h, ec'h ehan da veva,
Evel ar c'horf, pa n'euz mui da zibri na d'eva.

PEMPVED GUERS.

SAKRAMANT AN OTER
EO TESTAMANT NOR ZALVER.

Ton : *Santez Mari.*

O! peger caer testamant hoc'h euz grat, va otrou,
Evit roi d'ho pugale guir e gloar an envou
Hag evit discouez d'an dud bete divez ar bed
Hoc'h euz, leun a drugarez, gand ho coad ho frenet.

Gand ho coad hoc'h euz skrivet dirag hoc'h c'hestel,
Goude ean d'ar iaou-ambli, ho testamant santel,
Pa rozot d'eo da eva didan ar spes a vin
Ar goad a dlle redez euz ho couliou divin.

Ar c'hallir-ma gant va goad, c'inezo'h, va Doue,
En eur roi d'hoc'h c'hestel ar merk-z' a garante;
Eo an testamant nevez an euz-me va-unan
Skrivet henoz evidoc'h hag evit peb-unan.

Va Jezus, var an oter enna ho testamant
Didan ar spesou dister evez ar zakramant;
Ho madelez evidomp, ho c'hoant braz d'hor prena
Gand un dorn carantezuz hoc'h euz merket enna.

Va ene leun a fizians an envou a c'hortoz:
Dre ho testamant hon euz guir en ho paradoz:

Merket hoc'h euz varnezan e vev da viken
Ar re ho tigemero evel guir gristenien.

Mez ivez ho testamant ne ro guir en envou
Nemet d'ar re a dosta ouz ar zakramanchou;
Er c'hontroll, ennan hoc'h euz skrivet daonation
An dud ne dostaont ket ouz ar communion.

Dilezel testamanchou skrivet gand hor c'herent
N'a ve nemet dilezel ar madou a verkfent;
Hogen neb a zilesfe hoc'h hini, va otrou,
En ifern a ziskente en eur goll an envou.

Hastit eta christenien, tostait ouz an oter,
Kemerit gat carantez testamant hor Salver;
Hirrez en denz d'ho kuelec' oc'h ober kement-ze,
Discouezit pelloc'h dezan ez oc'h he vugale.

C'HOUEC'HVED GUERS.

CARANTEZ HOR ZALVER
E SAKRAMANT AN OTER.

Ton : *Santez Mari.*

Euz ar mor braz e cavomp an hed hag an donder,
Mez den ebet ne gavo an hed, al ledander,
An donder, an huelder euz carantez Doue
E sakramant an oter evit he vugale.

En nosvez ma oa guerzet gand an treitour Judaz
Ha carget a chadennou evel eur Barabbaz,
En nosvez-ze a c'hlae'har e prizaz hor Zalver
Lezel gand he vugale sakramant an oter.

Ne oac'h-hi ket souezet, eled euz an envou,
O velet ar garantez euz Jezus hon otrou?
Biscoaz ne oe henveloc'h ouz eur madoberour
Eget pa oa kemeret evit un torfetour.

Ne fellaz ket d'hor Zalver, pa iee d'an envou,
E vijemp emzivaded er vro-man a zaelou;
En he zakramant santel, cuzet var an oter
E chomaz en hon touez evel un tad tener.

Va Jezus, e peb amzer e tiscouezit oc'h mad :
Goude m'hoc'h enz evidomp scuillet eur vech ho coad,
Hen likit c'hoaz da redez bemdez en oferen
Evit ma velc'ho bepred eneou ar bec'herien.

Meulet ra viot eta var an trôn benniget
Hoc'h euz savet en iliz evid hon eurusdet ;
Alesse d'ho-pugale ho pennoz a roit
Ha divarnezho bepred an droug a zistroit.

Gervel a rit da vedoc'h ar paour, ar pinvidic,
Ar brinsed, ar rouaned hag an dud reuzeudic ;
Bepred e talc'hit digor ho caera tenzorieu
Evit roi da beb-unan hervez he ezommou.

Hogen crevoc'h hor galvit, pa fell d'an droue spered,
Ar gounnar, en he galon, hon dougen d'ar pec'hed ;
Divar ho trôn a rone ker buan e savit
Ha sicour da beb-unan gand hast e kinigit.

Guelloc'h c'hoaz e tiscouezit madelez ho calon,
Pa brizit dont da vedomp dre ar gommunion ;
Brasoc'h e tigor neuze tenzor ho carantez
Ha varnomp oll e scuillit ho cras gant largentez.

Pa ve clanv ho pugale ez it beteg enno
Hag euz ho caera grasou e scuillit varnezho ;
Pa'z cont euz ar bed-man, e tougit ho eneou
Etre ho tivrec'h santel e trezeg an envou.

Ar re a yev, va Zalver, hep caret ac'hanoc'h
Ne ouzont ket peger mad ha pegen caer ez oc'h ;
Scleraït pelloc'h eta spered ar bec'herien
Evit ma teui ho c'halon d'ho caret da viken.

Desket am enz, va Jezus, eo braz ho madelez,
Rac-se bepred ho meulin gant laouenedigez ;
Divar ho trôn benniget roit d'in ho pennoz
Da c'hortoz ken n'ho kuelin e gloar ar baradoz.



SEIZVED GUERS.

JEZUS-CHRIST EN DEUZ HIRREZ DA ZONT EN HOR C'HALONOU DRE AR GOMMUNION.

Ton : Santez Mari.

Hor Zalver a lavaraz gant ar vraza dousder
Pa roaz d'he ziskibien sakramand an Oter :
Hirrez em boa, mignonet, pell zo em boa hirrez
D'ober ganeoc'h ar pask-man aroc coll ar vuez.

Ia, c'hoant en doa Jezus da roi d'an ebestel,
Evit merg a garantez, he gorf, hé voad santel,
Rac torfet Judaz zoken ne hellaz ket miret
Ne roaz laouen dezo he vanked benniget.

Kercoulz evel er gamb-lid e fell c'hoaz da Jezus
E recefemp he gorf sakr hag he voad prisiuz ;
Bepred e chom en iliz, petra bennac ma ve
E calon meur a judaz trahiset a neve.

Galloud a ra pep christen, e pep lec'h euz ar bed
Tostaat, pa fello dezan, ouz an dol benniget,
Rag, a drugarez Doue, abaone hor Zalver,
Befeien hag ilizou e pep lec'h e caver.

Evel an den pinvidig, ar paour en deuz ive
Ar galloud da vont bemdez da vanket e Zoue ;
Rac didan spesou dister hor Zalver benniget
En em ro d'an dud paoura evel d'ar rouaned.

Ha gallet en devije discoueza guelloc'h d'omp
Peger braz hirrez en deuz da zonet davedomp ?
O ! menlomp a vir galon, o ! menlomp an Doue
A zeu ker carantezuz da ved he vugale.

Pe seurt plijadur e clask, pa fell dezan disken
Divar an dol benniget e calon pep christen ?
Nicun nemed an hini da ober vad d'an oll,
Miret e felle dezan n'ez afe den da goll.

Hastit eta, va breudeur, da dostaat ouz Jezus,

Chelaouit oc'h ho kervel he vouez carantezuz ;
Tostait, paour ha pinvidig, dent d'am digemeret ,
Ar galon em digemer a gav an eurusdet.

EIZVED GUERS.

AR C'HRISTEN MAD EN DEUZ HIRREZ DA DOSTAAT OUZ AN DOL ZANTEL.

Ton : *Saniez Mari.*

Jezus, petra nemedoc'h er bed-ma glaskin-me ?
Petra zoken a glaskin nemedoc'h-hu en e ?
Hastit da zont da vedoun dre ar gommunion
Evit ma reno pelloc'h an eur vad em c'halon.

Redec a rer hep paouez varlerc'h an eurusdet
Ha biskoaz pell diouzoc'h n'en deuz den ho c'havet.
Hastit da zont....

Va Doue, pell diouzoc'h ne gavan nep dousder
Ar c'haera festou zoken a zo leun a c'honervder.
Hastit da zont....

Va c'halon eta, Jezus, a zo gret evidoc'h,
Rac na ve morse diboan, pa ve pell diouzoc'h.
Hastit da zont....

Clevet am ouz e teskit guir hend an eurusdet
Da biou bennag a zelaou ho comzou benniget.
Hastit da zont....

Encrezet oc'h ho kedal pep devez a gontan,
Hag hir egz eur gantved pep devez a gavan.
Hastit da zont....

Va ene kez a zizec'h dre dan ho carantez ,
Pe goulz e vin-me caset d'ar feunteun a vuez ?
Hastit da zont....

Pe goulz e torrin-me cren va naon ha va zec'hed ?
Pe goulz e vin-me ganoc'h ouz an dol benniget ?
Hastit da zont....

Perag, evel eur goumic, n'emeuz-me ket eskel

Evit ma nichen buan betek an dol zantel ?
Hastit da zont....

Sellit a druez ouzin, o tad trugarezuz,
Chelaouit gant madelez va feden hirvouduz.
Hastit da zont....

Va ene paour a zempla o c'hortoz kelt amzer...
Bepred ema couscoude va fizianz em Zalver !
Hastit da zont....

Ra viot da virviken adoret, va Zalver,
Clevet hoc'h euz ouz peden ho falla servicher ;
Donet a rit da vedoun dre ar gommunion
Evit ma reno pelloc'h an eurvad em c'halon.

NAVED GUERS.

HIRVOUDOU AR PEC'HER GLAC'HARET.

Ton : *Au sang qu'un Dieu...*

Guelet a ran, o va Zalver,
An dud santel o vonet
Gant fizianz trezeg an oter
Evid ho tigemeret.

O ! me garfe monet ganto
D'ar banked a garantez
Hoc'h euz darevet evito
Gant kemend a vadelez.

Evel kemeret ar bara
Gret evid ar vugale
Hag hen roi d'ar chass da zrailla
N'a ve ket mad, va Doue,
Evelse er stad a bec'hed
Me na dleat ket tostaat
Ouz an dol gac'h hoc'h euz savet
Evid ar gristenien vat.

Evel ma lezer couscoude
Ar chass bian da zibri
Ar bara bruzunet a ve
En dro da dol ho mistri,

Evelse, Jezuz, e credan
Goulen eul loden dister
Euz an tenzor caer a velan
Digoret var an oter.

Ne zellezan ket, va Jezuz,
Monet hirio d'ar banked
En denz ho torn carantezuz
En ho sakramant cuzet,
Mez, pa zeuot gant madelez
Da ved ho kuir diskibien,
Grit ouzin eur zell a druez
Evel ma rin pinijen.

C'honi hoc'h euz va frenet ivez
Dre'n dellid euz ho poanion,
Va likit c'hoaz dre drugarez
Var hend euruz an envou;
O ! me garfe kuitaat pelloc'h
Renk mezuz ar bec'herien
Ha digemeret ac'hanoc'h
Evel ho kuir diskibien.

Teuzit ar scorn euz va c'halon
Dre'n tan euz ho carantez,
Rac neuze ho speret guirion
Em c'helenno gant frouez,
Ha souden ho tigemerin
Evel ma muia caret
Da c'hortoz ken n'hoc'h adorin
En envou gand an elet.

DECVED GUERS.

HOR ZALVER A C'HOUC'HEMEN D'OMP TOSTAAT OUZ AN DOL ZANTEL.

Ton : *Santez Mari*, pe ton *Kelven*.

Christenien, ma na zebrit corf santel ho Salver
Ha ma na evit he voad cuzet var an oter,
Ne vevot ket er bed-man e carantez Doue,
Na gantan el levenez ne vevot ket en eê.

Chelaouit mouez ho Salver, tostait ervad outan;
Ma teufec'h dre ziegi da bellaat dioutan,
Petra bennac ma kerfec'h, ho penn leun a fonge,
Hoc'h ene a ve siouaz maro dirac Doue.

Guelet a rer tud varo ken-nebend distrujet
Ma ver tentet da gredi n'a vent ket tremenet;
Ho liou a ve c'hoaz varno, groez en ho izili
Hag ho daoulagad digor evel re peb hini.

Evelse hiniennou a ia d'an oferen,
A lavar ho fedennou, a ro an aluzen,
A zo marteze hanvet mignonet da Zoue,
Couscoude siouaz dezo ne vev ket ho ene.

Ha p'ho c'hlefen o cana ker caer evel elet,
O comz divar-benn Doue ker coulz ha doctoret,
Huel c'hoaz e lavarfen : nebeud eo kement-ze;
Pa na gommuniont ket, ne vev ket ho ene.

Ha pa onifent an oll draou a heller da c'houzout,
Ha p'ho guelfen o lakaat ar rec'hier da gerzout,
Huel c'hoaz e lavarfen : kement-ze zo dister,
Pa na ier ket da zibri ouz tol zacr hor Zalver.

Perac ne hoaniont-hi ket evit mad an ene
Pehini a zo crouet henvel ouz he Doue,
Evel ma poaniont bemde da zerc'hel e buez
Ar c'horf pehini a zo leun a vreinaadurez?

Ractal ma teu dorn Doue d'ho scoi dre ar c'hlenved,
Dre bevar c'horn ar c'harter e claskont ar iec'hed;
An traou ar falla blazet, gant mall e kemeront,
Pa gredont e vianaint ar boan a c'houzanvont.

O c'honi pere a gavan ker stag ouz ar vuez,
Ma velit ato gant poan o tostaat he divez,
Denit da gommunia evel guir gristenien :
En hosti zacr e caver eur vuez hep termen.

Ne chomit ket, va breudeur, em amzer da zonet
Hep tostaat ouz tol zantel ho Salver benniget,
An neb her gra dre zispri, pe dre leziregezh
A zerr outan he-unan an or a drugarez.

Guir voed an enecou christen zo var an dol zantel :
Outi e renkont tostaat dindan boan da vervel.

Evel ma varfe soudan an dud, ar re greva
Pere ne felle dezo na dibri nag eva.

Ouzoc'h eta, va Zalver, e tostaln aliez,
Ne lezin mui va ene da gavout dienez;
Me fell d'in beva hepred e renk ho pugale,
En draonien-man a zaelou ker coulz evel en eo.

UNNECVED GUERS.

HOR MAM ZANTEL AN ILIZ A C'HOUC'HEMEN
D'OMP COMMUNIA DA VIANA EUR VEC'H ER BLOAZ.

Ton : Santez Mari.

An oll gristenien leal a dle communia,
Pep hini en e barrez, da Bask da viana,
Nemed ho c'hovesored a rofe d'eo amzer
Evid en em zarevi da vanked ho Zalver.

Mar chom eur c'hristen bennag heb ober kement-se,
An iliz ra vo serret outan hed he vuc;
Mar digouez dezan mervel heb eur guir binijen
Ra vo c'hoaz serret outan hered ar gristenien.

Cetu penoz, va breudeur, o deuz gourc'hemennet
Er bloaz mil daon c'hant pemzec, e Rom, en eur Sened,
Ar pab bag an eskibien kelennet gand Doue
Ha carget euz ar galloud da ren he vugale.

O! poan a ra d'omp guelec ez euz c'hoaz christenien
Pere pegement bennac ma ouzont al lezen,
A jom dre leziregezh, dre zispri marteze,
Hep tostaat gad an dud all da Bask ouz ho Doue.

Petra bennac ne ma ket en amzer man ar giz
Da viret ouz an dud-ze da zonet d'an iliz,
Mar deont euz ar bed-man heb eur guir binijen,
Dor ar baradoz dezo ne zigoro biken.

Brema ker coulz ha gaechall an iliz a helfe
Chom hep digeri dezo hered he bugale;
Mez, ha p'ayent er bed-ma gad an dud enoret,
Er bed all, siouaz dezo, e vezint milliget.

DAOUZEGVED GUERS.

HOR MAM ZANTEL E DEUZ C'HOANT EZ AFEMP
ALIEZ DA GOMMUNIA.

Ton : Santez Mari.

Ho mam an iliz santel a garfe ho kuelec
O tostaad e peb ofern ouz an dol benniget
Evit ma teufe frouez sacrisis mah Doue
De veza talvoudecoc'h evit he bugale.

Hogen eur c'hrouadur mad a veler o senti :
A vec'h ma lez gand he vam an amzer d'he bedi :
Un hanter comz, eur zellig, an drem anci hepken
A ra kement varnezan evel un urz zoken.

Eur c'hristen mad, hep gedal gourdrouzou an iliz,
Heb aoun ebed da veza barnet gand ar bediz,
Pa vel ar pezh a c'hortoz ar vam-ze digantan,
Her gra evel p'e defe her c'hemennet dezan,

Ma renkfemp beza spontet dre'n escommunigen
Aroc ma claskfemp beva evel guir gristenien
E vemp e giz bugale pere ne zentont tam
Nemet gourdrouzet a vent gand ho zad pe ho mam.

Perag eta, va breudeur, e chom hiniennou
Epad ar bloaz hep tostaat ouz roue an envon?
Perac ne vev ket an oll e giz an dud santel
A zeskaz lezen Doue e scol an ebestel?

Ar maro var ho henchou, ar gristenien genta
A rede d'an ofern ha da gommunia;
Kemend e karent Doue ma poanient da tostaat
bemdez ouz tol benniget ho Zalver hegarad.

Maget ouz an dol zantel o deuz ar verzerien,
Calbneg en ho foanlou, skuizet ho bourrevien,
Sonezet an dud hep feiz, frealzet an dud vad
Ha gret christenien nevez, en eur scuilla ho goad.

Ar zent o deuz oll clasket ha cayet guir zicour
E sakramand an oter eneb ho onebour;

Eno e cavent ar peuc'h en ho foanion spered
Hag an nerz da c'houzanvi pep tra gant joausded.

Ma sonjec'h mad, christenien, en tenzor ar c'hraou
A zigas Jezuz gantan, pa zeu er c'halonou
Ho pe hirrez da dostaat ouz un tad ken tener
Evit ma scuille varnoc'h e c'hraou hep niver.

TRIZECVED GUERS.

PEDENNOU AROG AR COMMUNION.

Ton : *Santez Mari.*

Akt a feiz.

Rac m'hoc'h euz hen discleriet e credan, va Zalver,
E chomit e guirionez cuzet var an oter
Evit roi d'ho pugale gant teneridigez
Ho corf, ho coad, hoc'h ene, ho cras, ho touelez.

Souden e tigemerin, en eur gommunia
Ar c'horf hoc'h euz kemeret en eur zond er bed-ma
Ha souden em goazied e redo ar goad-ze
Scuillet var menez Calvar evit paea hon die.

Akt a esperanz.

An esperanz a ro d'in dellid ho pasion
A gresko c'hoaz, va Zalver, dre va c'hommunion;
Pa roit d'in ar c'haera euz ho madoberou
E hellan gedal pep tra diganoc'h, va otron.

Gant fizianz e c'hortozan digant ho madelez
Ar c'bras da bignat un deiz en ho rouantelez;
Hervez ho comz e vevo ganoc'h e ti ho tad
An dud a vag ho eneou gand ho corf hag ho coad.

Akt a garantez.

Goude m'hoc'h euz hor prenet e teuit, va Doue,
Gand eur garantez dispar, da vaga hon ene;
Petra omp-ni dirazoc'h, roue braz an envou
P'hor c'hargit ker calonog euz ho madoberou?

O! me ho car, va Jezuz, euz oll nerz va ene,
Biken netra nemedoc'h ne garin, va Doue;
Me fell d'in da viana da viken ho caret
Evel m'her gra en envou ar zent hag an elot.

Akt a humilite.

Kemend am euz a dlean d'ho madelez hepken:
Pannevet-hi, va Jezuz, ne vevfen ket zoken;
Torret am euz conscoude ho lezen benniget,
Penez e credin-me ta tostaat ouz ho panked?

Va Doue leun a c'halloud ha leun a zantelez,
Me n'oun nemed eur pec'her leun a zempladurez,
Hag e fell d'oc'h va maga gant bara an cled
Epad ma tlefen gouzanv an naon hag ar zec'hed!

Akt a fizianz.

Ennoc'h hepken e lakaan va fizianz da viken:
Euz an env oc'h diskennet da glasg ar bec'berien
Ha discouez mad a rezot dre vrasder ho poanion
Ar c'hoand hoc'h euz d'ho c'havout ha d'ho c'has d'an
envou.

Rac-se, pa brizit hirio va gervel d'ho panked
E tostain leun a fizianz ouz an dol benniget;
Varnezi e tiskennit gant teneridigez
Evit roi d'ho pugale ar bara a vuez.

Akt a c'hlac'har.

Petra bennac m'am euz bet gras caër an absolver
Ha ma valean keuziec gand hend ar binijen,
Daoulinet var an douar ho pedan, va Jezuz,
Da velc'hi c'hoaz va ene gand ho cras gallouduz.

Guir geuz am euz da veza disprizet aliez
Gourc'hemennou un Doue kel leun a vadelez;
Ra zavo em daoulagad diou feunteun a zaelou
Evit ma hellin pelloc'h gouela va fec'hejou.

Akt a zezir.

Va ene paour, va Jezuz, a glasg an enrusdet,
Mez biscoaz pelli diouzoc'h n'en deuz den ho c'havet,
Deuid eta da vedoun dre ar gommunion
Evit ma reno-pelloc'h an curvad em c'halon.

Peden d'ar Verc'hez.

Scuillit ho pennoz varnon, rouanez an eled,
Aroc ma'z in da gavout tol ho muia caret;
Muioch e plijo dezan calon he zervicher,
Pa vezo bet benniget gant dorn he vam dener.

PEVARZECVED GUERS.

PEDEN GOUDE AR COMMUNION.

Ton : Santez Mari, etc.

O devez a blijadur ! o devez evuruz !
Va Jezuz a vev enon ha me vev e Jezuz !
Bremen e santan ervad dousder a garante,
Tanvair oll hag e velot peger mad eo Doue.

Jezuz, ra viot meulet : un Doue oc'h ker mad,
Ma vagit ho servicher gant ho corf hag ho coad;
Ne deuz ket var an douar un tad hag en defe
Un hevelep carantez evid he vugale.

Sent hag eled an envou, guelit va eurusded :
Ar roue braz a veulit e palez an Drinded,
A ren em c'halon brema gant teneridigez,
Petra hoc'h eus-hu ouспен en he rouantelez?

O va guir madoberour, penoz e halfen-me
Beva heb hoc'h adori euz oll nerz va ene?
Tommit bepret va c'halon dre dan ho carantez
Hag e kendalc'hin pelloc'h d'ho caret hep paonez.

Ho trugarecad a ran euz a greiz va c'halon
Evid ar c'hraz am euz bet dre va c'homunion;
Mar chomfen heb ho meuli evel va guir otrou
Ra zeufe kentiz va zeod da scorna em genou.

Da vad e vouestlan hirio d'ho servich, va Doue,
Va spered ha va c'halon, va c'horf ha va ene;
Er boan evel en dudi e keit a ma vevin
Ho courc'hemennou zantel gant aked a virin.

Ra vevin en ho toujanz hag en ho carantez;

Gant fizianz her gortozan digand ho madelez :
Pa brizit don ! em c'halon divar an dol zantel,
Ne zeuit ket da vedon evit va dilezel.

Ra zeuio var va c'herend ar spered a furnez
Evid ne gollint biken hend ho rouantelez;
Mar bale darn anezo da heul ar bec'herien
Grit ma tistroint ouzoc'h dre eur guir binijen.

It, pastor carantezuz, ha claskit an denved
N'o deuz ho clevet biscoaz pe o deuz ho collet;
Evid ho zilvidigez hoc'h euz scuillet ho coad
Ker coulz hag evit hini ar re ho hanv ho zad.

Ouz encoar purgator grit eur zeil a druez,
E creiz an tan e chomont er vrasa dienez;
Dre'r pezh hoc'h euz gouzanvet diverrait ho foanion
Evid ma pignint kentoc'h d'ho meuli en envou.

Kenavo, Guerc'hez santel, kenavo, va mam ger,
Ho pennoz a c'houlennan aroc monet d'ar ger
Evid na gollin biken an tenzor benniget
Am euz bet en eur dostaat ouz ho muia caret.

PEMZECVED GUERS.

PEDEN ALL GOUDE AR COMMUNION.

Ton : Santez Mari, etc.

Va muia caret zo d'in, me d'am muia caret,
Eur burzud a garantez en deuz hon unvanot.
O pegen eurus oun-me, pa zoug an em c'halon
Jezuz, va madoberour, Jezuz, va guir vignon !

M'hoc'h ador a vir galon, ô Jezuz, va c'hrouer,
Va Zalver trugarezuz hag an deiz va barnar,
Bremen e credan startoc'h hoc'h euz va dibabet
Evid adori en env hoc'h hano benniget.

Em'omp hon daou, va Zalver, a gorf hag a ene,
Evid va mad, unvanet an eil gant egile;
Ennoc'h e ma va c'halon, ho calon em hini,
Me a zoug ho touez hag ho douget oun ganti.

Chomit ganen , va Jezuz , chomit ganen hepred
 Evit ma trec'hin pelloc'h galloud an drouc-spered ;
 N'am lezit ket va-unan , pa zeuio d'am zempti ,
 Hoc'h enebour eo ivez ker coulz hag hon hini.

Ennan e crog ar gounnar , p'ho meuler , va Doue ,
 Ker coulz evel pa scuillit ho craz var hon ene ;
 Evel ma felse dezan miret n'a vemp salvet
 E felse dezan ivez miret n'a yec'h meulet.

Plijet ganoc'h va disen diouz va enebour :
 Evid ho cloar ho pedan da zonet d'am ziconr ,
 Ne lezit ket anezan da goll na da voapaat
 Un ene crouet ganoc'h ha prenet gand ho coad.

Grit ma c'honezo ivez var ho enebourien
 Va c'herent , va mignonet , va madoberourien ;
 Digast hoc'h eled santel d'ho dioual noz ha deiz ,
 Discouezit dezo hepred sclerijen ar guir feiz.

Va Doue , carit hepred bugale Breiz-Izel
 Evit ma vevint ato hervez an aviel.
 Evel-kent roit ivez da Vro-C'hall ho pennoz
 Ha likit an oll bobliou var hend ar baradoz.

Tennit euz ar purgator an anaon hirvouduz ,
 Digorit buan dezo ho palez dudiu ,
 Casit ganoc'h da genta va c'herent tremenet
 Ha digemerit ivez an eneou dilezet.

C'HOUEZECYED GUERS.

VAR AR GOMMUNION SACRILECH.

Ton : *Au sang qu'un Dieu....*

Souezet braz eo va spered ,
 Ha laouen eo va c'halon ,
 Pa zonjan en evurusded
 Hon euz dre'r gommunion ;
 Aman e velan un Doue
 Diskennet euz an envou
 O tigori d'he vugale
 Caera tenzor he c'hrasou.

Hogen mantret gad an anken
 E tleffen gouela dourc
 Pa glevan e teu christenien ,
 Heb aoun rag ar Galloudec ,
 Da stag' ouz ar groaz a nevez
 Jezuz va muia caret
 P'ho digemer gant carantez
 Oc'h tol zantel he vanked.

O! dister eo torfed Pilat
 Hac hini ar juzevien ,
 Pec'her kez , p'a ve lekeat
 Ho torfed en ho c'hichen ,
 Rac dister e oa ar grasou
 Scuillet var an dud neuze
 E kenver ar madoherou
 Hoc'h euz bet digant Doue.

Un druez vraz e oa gullet
 Jezuz e creiz he boaniou :
 Ouz ar groaz he gorf gouliet
 E oa staget gant tachou ;
 Mez goasoc'h a rit , tud dallet ,
 Pa dostait ouz an oter :
 Didan treid louz an drouc-spered
 E likit korf ho Salver.

Guir eo n'en deuz mui ar maro
 Galloud ebet varnezan ;
 Netra mui zo ken ne raio
 An distera poan dezan ;
 Mez siouaz ! dre ho torfejou
 E rit avoalc'h , tud cabluz ,
 Evit nevezi oll boaniou
 Ho Salver trugarezuz.

Braz a ve ho tristidigez
 Mar velfec'h un den divad
 O leuskel gant fallagriez
 Un tenn fuzil var he dad ;
 Ha p'en defe tennet e-biou .
 E ve disprizet ato
 Hac hanvet a gleiz hag a zion
 An dismeganz euz he vro.
 Chetu an tad an tenera

Didan ar spesou zantel :
 Mar teuit da gommunia
 E stad a bec'hed marvel,
 E tellezit m'a ve scrivet
 Da viken var hoc'h eneou
 Hoc'h euz a galon merzeriet
 Ar guella euz an tadou.

Mar d-co caledet ho calon,
 Pa dostait ouz an oter
 E tebrit ho taonation
 Scrivet gant goad ho Salver ;
 E lec'h digemeret Jezuz
 Evel hoc'h oll esperanz,
 E cavit eur barner spontuz
 Hag en he zorn ar veujan.

Da heul un hevelep torfed
 E teu pep seurt clenvejou,
 Ar maro e creiz ar lec'hed
 Pe ar brasa dizeurion ;
 Mar priz barner ar varnerien
 Var an dopar hoc'h espern
 Er bed all e renkot disken
 Donoc'h e panz an ifern.

En han-Doue scuillit daelou
 P'hoc'h euz en ho tallentez
 Glac'haret Jezuz hoc'h Otron
 E banked e garantez ;
 Evel an treitour milliget
 Hoc'h euz guerzet ho Salver,
 Pedit 'ta Doue da viret
 Ne gouezot en dizesper.

Kuitait huan ho coall vuez
 Ha bevit en esperanz :
 Jezuz c'hoaz leun a drugarez
 Ne gar ket tenna veujan ;
 P'en deuz pardonnet gant dousder
 Var ar groaz d'ho vourrevien,
 E pardonno var an oter
 D'an dud a rai pinijen.

SEITECVED GUERS.

PEDEN DA JEZUZ DISPRIZET VAR AN OTER.

Ton : *Au sang qu'un Dieu....*

Jezuz hepred var an oter
 E chomit dre garantez
 Evit roi d'omp e peb amzer
 Ho crasou gant largetez ;
 Hogen e lec'h beza caret
 Hag enoret gant pep den
 Ez oc'h aliez disprizet
 Gand ho pugale zoken.

Guelet hon euz, ô va Jezuz,
 An aeronant milliget
 O sevel he benn ourgonilluz
 Var zu ho tron benniget ;
 He zent a strag gand ar gounnar
 Abalamour ma vouler
 Crouer an env hag an douar
 E sacramand an oter.

Nemet re ne veler bemdez
 Oc'h heulia he vanielou
 Er brezel a ra hep paouez
 D'oc'h-hu, roue an envou ;
 Au dud hep seiz a gerz ganta
 Var lerc'h an heretiket,
 Calz re all c'hoaz en em laka
 E touez he zondardet.

Guelet a zo bet un amizer
 Leun a bep seurt torfejou :
 Lekeat e oac'h, va Zalver,
 Er mez euz hoc'h ilizou ;
 Goad ho pelecien a rede,
 Ar c'hroasion a oa pilet,
 Hag an dud vad oll a grene
 Gand aotri da veza lazet.

Brema c'hoaz hoc'h enebourien,
 Hep beza ken dirollet,
 A garfe guelec ho lezen
 Gand an dud oll disprizet;
 Dre ho goall souter, ho goaperez
 E claskont roi da gredi
 Ne d-eo nemed eur follentez
 Ho caret hag ho meuli.

Meur a judaz a zen ivez,
 Ar mel var ho muzellou
 Gand ar vrasa fallagriez
 E goueled ho c'halonou,
 Da zigemeret ac'hanoc'h
 Divar an dol benniget
 Evit ma hellint buanoc'h
 Lakaat an dud d'ho c'haret.

Ni hon-unan hon euz ivez
 Mantret mil guez ho calon
 Dre hon nebeud a garantez
 Evid ar gommunion,
 Dre ar goall souter hon euz roet
 En hoc'h ilizou zoken
 Ha p'hon euz lezet hor spered
 Dievez en oferen.

Setu perac leun a c'hlac'har
 E teuomp beteg enoc'h
 Hag en em strinkomp d'an douar
 Evid ho pedi guelloc'h;
 Pa velit c'hoaz tud glac'haret
 Daoulinet en ho kichen
 Ancounac'hait ar boan spered
 A ra d'oc'h ar bec'herien.

Guir eo penoz hor pedennou
 Ne zellezont ket sevel
 Evit mont da lein an envou
 Beteg an Drindet santel;
 Hogen-ennoc'h e lekeomp
 Hor fizianz, ô va Zalver,
 Rac dre garantez evidomp
 E chomit var an oter.



Renit da viken, va Jezuz,

Renit var ho pügale,
 Trec'hit gand ho croaz gallouduz
 Enebour braz an ene,
 Evit m'ho pezo an dudi
 Da velet e peb amzer
 Christenien vad oc'h ho meuli
 E sacramand an oter.

Va Jezuz, gonezit ivez
 Calonou ar bec'herien
 Ha gand ar vrasa levenez
 Ho meulint da virviken;
 O ! peger caer a ve guelec
 Euz an huella envou
 Hoc'h hano santel anavet
 Ha meulet en oll broiou.

Dirac Jezuz, hor c'harantez,
 En em voestlomp, christenien,
 D'he garet epad hor buez,
 D'he garet da virviken;
 O ! lezomp an dud dirollet
 Da redez d'an ebatou:
 Dirag an oter benniget
 E cavomp an oll joalou.

Eled hag arc'heled Doue
 En dro d'an oter renket
 Evid adori ho roue
 En hosti zantel cuzet,
 Pedit evidomp pec'herien
 Evit ma hellimp ivez
 Her menli ganoc'h da viken
 E gloar he rouantelez.



TRIOUEC'HVED GUERS.

EVIT BENNOZ AR ZACRAMANT.

Ton : *Adoromp oll.*

Setu ganomp en hosti zaer hon Doue,
Aman e chom hor c'hroier, hor guir roue.
Petra bennac ma cuz he c'halloud, he c'hened
Ne hean ket da ren dre bevar c'horn ar bed.

Evel ma toug an hano caer a Zalver,
E toug ivez an hano braz a varner.
Ra vevimp er bed-man bepred en he zoujanz
Hag outan er bed-all e tostaimp gant fizianz.

Salver ar bed, ô tad leun a drugarez,
Dirag ho tron e claskomp ar guir furnez;
Evit na faziimp ket var hend ar baradoz
Gant feiz ho pedomp oll da roi d'omp ho pennoz.

Renit varnomp, va Jezuz, da virviken,
Hon likit oll da viret mad ho lezen;
Pa'z aimp euz ar bed-ma, kemerit hon eneou
Ha casit-ho ganoc'h d'ho meuli d'an envou.



GUERSOU NEVEZ

VAR

GOUELIOU AR VERC'HEZ VARI.

AN EIZYED DEVEZ A VIZ KERZU

GOUEL MARIA-GERZU.

Ton : *Santes Mari.*

Cronet leun a zantelez, a skiant, a spered,
Hor c'henta tad a vev e creiz an curuzded;
Hep poan ebet he vevanz diouc'h-het e c'ave
Hag outan an oll loenet gant doujanz a zente.

An dud a dlie beza, en eur zond er bed-man,
Oll santel evel Adam, evuruz evel dan,
Ha, goude beza bevet er plijadurezou,
E tlient mond evel dan, hep mervel, d'an envou.

Mez sionaz hon tad kenta, er pec'hed pa gouezaz,
Malloz an oll-c'halloudec var he benn a dennaz;
He bec'hed en deuz ivez collet he vugale;
Pep den a ve concevet enebour da Zoue.

Hogen meulet ra vezo tri ferson an Drinded,
Rac cavet hon euz unan concevet hep pec'hed;
Ar Verc'hez a enoromp evel mam d'hor Zalver
A zo mui eget n'icun dicourez d'hor c'hrouer.

Done an tad a viraz ouz prinz an droug eled
Da astenn var he verc'h ker he zaouarn milliget,
Gand hast he c'huzaz outan didan he ziou askel,
Kenta ma velaz anei e cov he man zantel.


Mab Doue, mab d'ar Verc'hez, en deuz e peb amzer
Miret outi da goueza 'tre daonarn Lucifer;
Pa oa concevet Mari, varnezi e rene
Ha dezi gant madelez he vennoz e roe.

Ar spered-glan a visc'az d'ar Verc'hez he bried
Evit se ar zantelezh, p'he guelaz concevet;
Kentiz e roaz dezi gant teneridigez
Evel d'ar fur Salomon ar spered a furnez.

Mari, ractal ma teuaz euz daouarn he c'hrouer,
Souezet oc'h he velet ker mad en he c'henver,
A rea gant levezon ar c'haera pedennou
Evid he drugarekad euz he vadelezhon.

PEDEN.

O Guerc'hez caer ha santel epad hoc'h oll vuez,
Grit ouzomp-ni pec'herien eur zell a drugarez,
Evit ma trec'himp ato en amzer de zonet
An enebourien a zeui d'hon dougen d'ar pec'hed.



AN EIZVED DEVEZ A VIZ GUENGOLO.

GOUEL MARIA-VENGOLO.

Ton : *Santez Mari.*

Evel ma rea bemdez ho kerent tremenet,
E reidit, e tiredit o clas an euruzed
Ha coll a reot ivez ho poan hag hoc'h amzer,
Ma na gemerit an hend a renkit da ober.

Ar guir vad a c'houlennit, hep beza chelaouet :
Ne halfec'h ket cousecoude caout muioc'h a zoneed;
Pep tra en ho tallentez a likit da Zoue,
An oll-c'halloudec hepken a lezit a goste.

Hastit da zonet pelloc'h da scol ar guir furnez,
Ne zerrit mui ho tiscouarn ouz mouez ar virionez;
Dilezit an idolon ha deuit da velet
Ar pezh a dremen hirio er ger a Nazareth.

O kerig a Nazareth ! gant pebez sclerijen
E sav ac'hanoc'h hirio ar vir verelaouen !
Prinsed euz ar baradoz a zeu d'he zaludi
Ha dezi e tigasont an hano a Vari.

En env ha var an douar meuleudi da Zone ;

Var lerc'h ar verelaouen e savo hep dale
An heol a die da viken scleraat ar sperejou
Ha teurel e peb amzer he c'hroez er c'halonou.

Mar claskomp a vir galon hend ar zilvidigez,
Heuliomp ar verelaouen gant laouenedigez;
Hep mar ebed e caso da gavout ho Zalver
An dud o deuz an eurvad da heulia he sclerder.

Evel diouz ar stered a hell ar vordeidi
Var-zu ar porz a glaskont sturia mad ho listri,
Diouz ar verelaouen e caver an henchou
A gass bugale Doue da berzier an envou.

PEDEN.

Mari, guir verelaouen, discouezit d'omp sclerder
Evit dizoloi hepred rouejou Lucifer,
Hag evit gueleat ato hend ar rouantelezh
A zo leun a sclerijen, a laouenedigez

GUERZ ALL EVIT GOUEL MARIA-VENGOLO.

Ton : *Santez Mari.*

Doue an tad, pa scrivaz var loor he drugarez
E roje d'omp da Zalver he vab, he garantez,
A verkaz e divize an Itron-Varia
An eurvad hag an enor d'he lakaat er bed-ma.

Mab Doue, 'vel ma lavar d'an oll guitibunan
Caret ho zad hag ho mam, en deuz bet he-unan,
Aroc ma teuaz zoken da jom var an douar,
Evid ar Verc'hez santel eur garantez dispar.

Da genver an deiz-hirio eil berson an Drinded
A zellaz gant plijadur e-treze Nazareth;
Ar Verc'hez nevez-ganet e velaz er ger-ze
Ha joauz e lavaraz : setu va mam aze.

Hogen ker mad eo Doue ma laka da zisken
Ar glao druz var zouarou ar vrassa pec'herien,
Peger calonuz eta euz a lein an envou
Ne scuih'hen ket var Mari ar gliz euz he c'hraon ?

Bete neuze ne oa bet nikan henvel outi,

Petra bennac ma vevaz tud sautel a ro-z-hi
Na nicun outi henvel hirviken ne zavo,
Ar genta reng er bed-ma gant Mari a jomo.

Pignit zoken, mar kirit, en envou a spered,
Guelit ar pezh a dremen e nao c'hœur an cled,
Selaouit mad ar guersou a ganont hep paovez,
Ha laouen e leverrot eo braz ho zantelez.

It goude-ze a spered da di Santez Anna :
Ar verc'hic ganet eno da genver an deiz-ma
A oa santeloc'h neuze eged ar sperejou
A gan bepred menlendi da roue an envou.

Meur bed eo braz ho calloud, va Doue, va c'hrouer :
Hogen, heb aoun da fazia, lavaret a heller
N'oc'h evid ober nicun en tu all d'an hini
A zoug ha gant guirionez an hano a Vari.

Va breudeur, menlomp Doue gant laouenedigez
Evid he vadelezoù e kenver ar Verc'hez,
Mez menlomp ivez Mari, rac m'e deuz divoallet
Ha cresket calz ar madou en doa dezi roet.

Bemdez e kerze Mari gand hend ar binijen
Ha biscoaz ne valeaz gand hend ar bec'herien ;
Evel ma poantie bepred da blijout da Zoue
Bete lein ar zantelez e pignaz hep dale.

Ouz Doue na zeree mam ebed nemeti
Na mab ebed nemetan na zeree outi ;
Rac-se gant joa e tenaz eil berson an Drinded
Euz a lein ar baradoz en he c'hof benniget.

PEDEN.

O Mari, ar zantela euz ar grouadurien !
Pedit ar Mab Jezuz evidomp pec'herien ;
Plijet gantan hon lakaat var hend ar zantelez
Evit ma pignimp d'ho heul en he rouantelez.



AN UNAN VARN-UGENT A VIZ-DU.

GOUEL MARIA-VIZ-DU.

Tou : *Santez Mari.*

Ar Verc'hez leun a zouder, a furnez, a spered
Hag ivez a vianic eur barzud a c'hened,
Evez ar roue David dr' he zad a ziskenne ;
Peb eurvad eta dezi ar bed a ginnige.

Mez hi a lezaz gantan he vadou berr-baduz,
Hep prizout biscoaz chelaou he gomzou touelluz ;
Abred ez eaz d'an templ da vouesta da Zoue
He spered hag he c'halon, he c'horf hag he ene.

Peger caer e oa gullet Joachim hag Anna
O vont da Jeruzalem da genver an deiz-ma !
Ho merc'hig gant carantez beb eil guech e tougent ;
Pa feille dezi kerzet dre an dorn he renet.

Da heul a verc'hig euz dent ganen a spered :
Dirag he zad hag he mam he guelan daoulinet ;
Digand he c'herent santel ho bennoz a c'houlenn,
Pokat a ra d'ho daouarn, he dremmlec zo laouen.

Benniget gand he c'herent e sav gant levezenn,
Ez a en templ gant doujanz, e vale gant furnez ;
Doue en deuz plijadur o velt ar c'hammejou
A ra 'trezeg an oter rouanez an envou.

Eled an envou, canit eur ganaouen nevez
Evid enori breman eured ho rouanez ;
Canit e denz calonec dilezet ti he zad
Evit kemeret Doue da bried evit mad.

O pobl a Jeruzalem ! pegen euz oud-te !
E barz da dempl e velan templ beo ar guir Doue ;
Daoulinet eo gant doujanz e kichen da oter
Ar verc'hez zo dibabet evit mam d'hor Zalver.

Yaouankic c'hoaz ha caret gand he mam hag he zad,
Diouz ar bed e pella evit clasq he guir vad.

O kentel gaer evidomp : eur verc'hig hor c'helen,
 Diouz he scouer disprizomp ar madou a dremen.

Ma n'hellomp ket evelldi dilezel hor c'heriou,
 Hor c'herent. hor mignonet, ar bed hag he vadou,
 E creiz ar binvidigez bezomp paour a spered,
 Oc'h en em zerc'hel distag diouz an traou crouet.

Ne scuizimp ket o vale gand hend ar binijen,
 Mar savomp hon daoulagad trezeg ar gurunen
 A dle hor barner lakaat var ben ar zervicher,
 En devezo kemeret ar Verc'hez evit scouer.

PEDEN.

Sellid a druez ouzomp, rouanez an eled,
 Distagit hor c'halonou diouz an traou crouet
 Evit ma kerzimp d'ho heul dre hend ar vertusiou
 Da c'hortoz pignat ganoc'h e templ caer an envou.



AR BEMP VARN-UGENT A VIZ MEURS.

GOUEL MARIA-VEURS.

Ton : *Santez Mari.*

Hervez he gomzou en deuz kemeret mab Doue
 Evid hor zilvidigez eur c'horf hag un ene;
 Hogen en deiz ma teuaz euz a lein an envou
 Un arc'hel a ziskennaz da zigaz ar c'helou.

Ne gasaz ket ar c'helou betek ar rouaned,
 Ne'z eaz ket ken nebeud da dier ar brinsed;
 Var eeun e nijaz buan e treze Galile;
 Eno o cavaz kentiz an hini a glasko.

Gand doujanz e tiskennaz er ger a Nazareth
 E ti eur Verc'hez santel d'eur c'halvez demezet;
 An hano caer a Vari ar Verc'hez a zouge,
 He fried, hanvet Joseph, 'vel eur zant a veve.

Bezit, guerc'hez, eme'n el, el laouenedigez;
 Doue en deuz evidoc'h ar vrasa carantez;
 Carget en deuz hoc'h ene euz he vadelezou,
 Biscoaz var zen evelse ne scuillaz he c'hrasou.

Bepred e chom ganoc'h-hu an Doue a veulit,
 Rac ma plij ato dezan ar vuez a renit;
 He zaouarn oll-c'hallouduz, dr'er vennoz ar vrasa,
 Ho sav dreist an oll gragez d'ar reng an huela.

Souezet braz e chomaz ar Verc'hez o clevet
 E vije, hi ken dister, gand Doue ker caret;
 Hep flach e souje gant nec'h en hini he meule :
 Gouzout e felle dezi a belec'h e teue.

Mari, eme an arc'hel, n'ho pezet aoun ebed,
 Hanvet ez oc'h gand Doue he verc'h muia caret;
 Eur mab a dleit souden concevi ha genel,
 An hano sacr a Jezuz a root d'ho pugel.

Ar mab-ze, braz e pep tra, a vezo mab Doue
 Hag he dad oll-c'halloudec hen lakai da rone;
 Var dron ar roue David da viken e reno,
 Oll bobl an Otrou Doue dindan-han a vevo.

E spered Mari neuze eur hoan all a zeuaz;
 Rac-se da gannad Doue gand hast e lavaraz :
 Gouestlet amez evit mad va guerc'hded da Zoue,
 En eur jom ato guerc'hez, ha mam e veziu-me?

Dre c'hraz ar Spered santel e lekeot er bed
 Eur mab a n'en devezo er bed-ma tad ebed;
 Guerc'hez e chomot eta, ô Guerc'hez diantec (1),
 Hag ho mab ker a vezo mab an oll-c'halloudec.

Mari, leun a vuelled (2), a feiz hag a fizians,
 He ger da gannad Doue a roaz gant doujans :
 Setu aman, emezi, servicherez Doue,
 Hervez ho comzou zantel ra vezo gret d'in-me.

An el, p'en doe kemeret grad Mari he brinsez,
 D'an env a nijaz buan gant laouenedigez :
 Ractal e cov ar Verc'hez mab Doue ziskennaz
 Ha, goude henvel ouzomp, er bed-man e vevaz.

PEDEN.

Mam Doue, bepred guerc'hez, enoret ra viot,
 Mam roet d'in gant Jezuz, da viken r' am c'herrot;
 Digand ho mab benniget goulennit hep paouez
 Ma vezin digemeret en he rouantelez.

(1) Pur meurbed. — (2) Humilite.

AN EIL DEVEZ A VIZ GOUERE.

GOUEL MARIA-C'HOUERE.

Ton : Santez Mari.

An arc'hel a ziscleriaz d'an Itron Varia
E vije mam d'an hini a zeuje d'hor prena
A laraz d'ei e touge santez Elizabeth
Aba c'houec'h miz eur mabic dre vuzud concevet.

Mari, leun a vadelez e kenver peb-unan
Da velet he c'hiniterv a iaz ker buan.
En eur vont e valsee gand hast ha levenez,
Rac ma cred' e oa galvet gant mouez ar garantez.

Peger caer e oa guelet rouanez an envou
O vonet buan var droad dre greiz ar menezion
Epad ma touge zoken en he c'hof benniget
Guir vab an oll-c'halloudec, eil berson an Drinded.

Mari, gand hast erruet e ty Zachariaz,
Ouz he c'hiniterv zantel laouen a dosteaz
Hag a lekeaz kentiz, en eur he zaludi,
Bennoz he mab benniget da zisken varnezi.

Pa glevaz Elizabeth mouez he c'harez vuel (1),
He mab, dre c'hraz he Zalver, en em gavaz santel
Ha kentiz e saludaz gant laouenedigez
He Zoue trugarezuz hag he vam ar Verc'hez.

Dre c'hraz ar Spered santel, Elizabeth ive
A vouezaz e oa Mari o tougen mab Doue;
Evelse, leun a zoujanz, e tosteaz outi
Ha gant laouenedigez e lavaraz dezi :

C'houi zo benniget muic'h eged an oll gragez,
Ar frouez caer a zouguit zo benniget ivez;
Hogen penoz em euz-me. maouez dister ma'z oun
Lekeat mam va Zalver da zont beteg ennoun?

Mari a zavaz buan, o clevet he c'homzou,

(1) Humbl.

He spered hag he c'halon etrezeg an envou :
Sonezet braz, emezi, e veulan va Doue
Da veza tollet varnoun eur zell a drugare.

Miromp egiz mam Doue lezen ar garantez :
D'an deiz-man evit monet da velet he c'harez
Var dro teir leo ha tregont e reaz var he zroad
Ha laouen, rac ma cave an tu da ober vad.

Ha c'houi marteze, siouaz, e lec'h mond euz ho ti
Da glasg ar beorien mezec, evid ho frealzi,
Pa velit en ho kichen ar paour he zorn digor,
E lec'h roi an aluzen, a zerr outan an or.

Ma na roit d'ar beorien un darn euz ho madou,
Birviken, tud didruez, ne bignot en envou,
Mez souden gand ho tanvez daspundet bern var vern
Evel ar falz pinvidic e couezot en ifern.

Hogen grit an aluzen : henvel a ra Jezuz
Madoberourien dezan an dud trugarezuz;
D'he vam e plijont ivez, rag en dud ezommec
Mari a vel bugale d'he mab oll-c'halloudec.

PEDEN.

Mari, mam oll-c'halloudec ha mad ouz peb-unan,
Ra girimp oll hon nessa eveld'omp hon-unan,
Rac lezen ar garantez eo lezen ar c'hristen :
An neb he mir a vevo en envou da viken.

AN EIL DEVEZ A VIZ C'HOUEVRER.

GOUEL MARIA-AR-GOULOU.

Ton : Santez Mari.

Perac d'an devez hirio e toug ar gristenien
Goulou coar en ho daouarn epad an oferen?
Evid enori Jezuz, sclerijen an eneo
Gouestlet en templ gant Mari da roue an envou.

Ar Verc'hez, ar zantela euz ar grouadurien,
A vire al lezennou roet d'ar bec'herien;

Evel gragez Israel, d'an iliz venniget,
Epad daou-ugent devez, e chomaz hep monet.

D'an devez gourc'hennet gant lezen Moysez,
Ez eaz ivez d'an templ, evel eur bec'herez;
Kinnig' a reaz he mab, dre zaouarn ar belec,
Evid hor zilvidigez d'he dad oll-c'halloude.

An den santel Simeon, pehini na c'hede
Er bed nemed an dudi da velet mab Doue,
Ouz Mari a dosteaz gand hast ha joausdet,
O velet var he divrec'h he Zalver henniget.

Jezuz etre he zaouarn, ar zant a lavarè :
Bremen e varvin contant, p'am euz bet, va Doue,
Hervez ho comzou zantel an dudi da velet
An hini a zigasit da zavetei ar bed.

Va breudeur, it a spered beteg an templ santel :
Jezuz, Mari, Simeon a ro meur a gentel
D'ar re o denz eur guir c'hoant da ziski ar furnez
A lak'an dud da gavout hend ar zilvidigez.

Abred e vouestl hor Zalver d'he dad ha d'he Zoue
He spered hag he galon, he gorf hag he ene :
Bepred, va zad, emezan, e virin ho lezen
Ker coulz hag an distera euz ho servicherien,

Epad ma euz hor Zalver he c'hloar, he zouelez,
Mari, he vam henniget, a guz he zantelez;
Pried ar Spered santel, 'n eur viret al lezen,
Gand he mab en em laka e reng ar bec'herien.

Simeon, p'en denz cavet an hini a glaske,
Ne c'houlenn mui er bed-ma netra digant Doue.
Evedan claskomp Jezuz, claskomp hen dreist pep tra
Ha p'hor bezo he gavet, na hetomp mui netra.

PEDEN.

Da Zoue, Guerc'hez santel, kinnig' ac'hanomp
Evel m'hoc'h euz kinniget ho mab ker evidomp:
Hor c'hasit, goud' hor maro dirac tron bor barner
Hag hen a rai d'hon eneo ar guella digemer.



AR BEMZECVED DEVEZ A VIZ EOST.

GOUEL MARIA-HANTER-EOST.

Ton : Quam pulchre graditur.

Dinijit oll ractal, eled hag arc'heled :
En deiz-man ar Verc'hez a vezo curunet,
Deuit 'ta gant levenez,
Deuit da gerc'hat ho prinsez.

Mam pell-zo glac'haret, ne scuillot mui daelou :
Savit ho taoulagad etrezeg an envou ;
Setu 'n eled o tisken ;
D'ar gloar a dleont ho tougen.

Ar gristenien vad.

Mam dener, aroc mont da c'hloar ar baradoz,
Roit d'ho pugale eur vech c'hoaz ho pennoz
Hag en eê pedit Doue
D'hor c'hass d'ho kueleit adarre.

Mari.

Biken ne zilezin va guir zervicherien.
Carit ato va mab, mirit oll he lezen,
Rag e gloar ar baradoz
Madou hep niver ho cortoz.

Ar bec'herien glac'haret.

O mam a drugarez, gant doujanz daoulinet,
Ho pedimp goude-hen evel emzivaded.
Sellit a druez ouzomp,
Pedit hep paouez evidomp.

Mari.

Va fedit gant fizianz, va fedit aliez ;
Bepred ho chelaouin gant calz a vadelez ;
Tec'hit diouz ar pec'hed,
Casait ho puez tremenet.
Mervel a ra Mari hep elnved, heb anken ;

Ar garantez hepken he laka da dremen
Hag he maro preciz
A gresg he gened burzuduz.

Evel re an dud all he c'horf a zo besiet,
Ne vo ket couscoude en douar dismantret,
Rag, a drugarez Doue,
Souden e savo euz ar be.

He be zo digoret : eled ar baradoz,
Daoulinet dirazi, a c'houlén he bennoz
Hag e creiz ar meuleudiou
E doug etrezeg an envou.

He gened a dremen gened an oll elled
Evel sclerder an heol sclerder an oll stered;
Caeroc'h eo he guiscamant
Eget p'ave aour hag arc'hant.

Prinsed ar baradoz, digorit ho toriou
Evid digemeret rouanez an envou;
Trec'h d'he oll enebourien
E peoc'h e vevo da viken.

Oll zent ar baradoz, pebez gouel evidoc'h !
Mam Salver ar bed oll a ia 'trezeg ennoc'h;
Deuit gant eur c'han nevez
Da ziarhen ho rouanez.

Divar ho zroniou caer, gant beb a gurunen,
Evid ar Verc'hez sacr, an oll zent a zisken
En eur gana gad dudi
Eur verz en enor da Vari.

Pa velont o tostaat ar Verc'hez leun a c'hloar,
Ar zent, evit meuli ho frinsez heb he far,
Gand an dudi ar vrasa
A gan oll : *Ave, Maria.*

Prinsez caer, emezo, deuet-mad ra viot,
Gand ho muia caret a vremen a renot
Ha ni ho servicherien
Gand joa ho meulo da viken.

Tremen a ra ganto dre berzier an envou
E creiz al levenez, e creiz ar meuleudiou
Mond a ra gand joasded,
Dirac tri ferson an Drinded.

Ractal leun a zoujanz e stou he daoulagad,
E za var he daoulin evit trugarcad
An Doue teir guech santel
En deuz he zavet ken huel.

O! peger braz e oa eurusded ar Verc'hez,
Pa velaz e teue Jezuz, he c'harantez,
Leun a c'hloar 'trezeg eni
Da zigemeret anezi.

Dre an dorn he c'hasaz var un tron lugernuz
En eur lavaret d'ei gand un dremm dudiuz :
Dal, rouanez an envou,
Alc'houe tenzor va oll madou.



PEDEN D'AR VERC'HEZ.

Ton : *Santez Mari.*

Mari, ni zo niveret a drugarez Doue,
Evel sant Ian abostol, e touez ho pugale
Rac-se bepred gant fizianz e credomp ho pedi,
Ha bepred gant levenez e teuomp d'ho meuli.

Rouanez ar gristenien, rouanez benniget,
Da viken an oll bobliou ho meulo gand aked :
Bez' hoc'h euz bet an enor da c'henel ho crouer
Ha da roi d'ar bec'herien mab Doue da Zalver.

Bepred ez oc'h chelaouet gant roue an envou :
Oll c'halloud peden eur vam o deuz ho pedennou;
Tenzor madelez Doue d'an dud a zigorit
Ha divar ho pugale an droug a zistroit.

Euz a lein ar baradoz, dre ma fell d'ho crouer,
Var an oll grouadurien e renit gant dousder;
En env ha var an douar e caner hep paouez
Eo braz meurbed ho calloud ha braz ho madelelez.

En enor d'oc'h e peb bro chapellion a gavomp,
En oll ilizou parrez hoc'h oter a velomp;
Teir guech en deiz ar c'hleier a zon an *Anjeluz*
Evid ma veulimp kevred hoc'h hano dudiuz.

Hogen morse n'ho peder hep beza chelaouet :

Bemdez tud clanv a c'houlen diganoc'h ar iec'hed;
Un niver braz anezo ractal a zeu pare,
D'an niver all e roit eur c'hras bennag ive.

Rac barn an Otrou Doue ar pec'her stavillet
A vel bepred dirazan an ifern digoret....
Ouzoc'h, mam a drugarez, e tosta gant fizianz
Ha buan en he galon e sav an esperanz.

E-leiz a dud encrezet daoulinet a veler
Bemdez o c'houlen cuzul e kichen hoc'h oter;
Bepred ho digemerit gant calz a vadelez;
Enoc'h e cavont ato eur vam leun a furnez.

Hep paouez an aerouant a stourm ouz hon eneoù:
En dro d'ar fura zoken e stenn he rouejou....
O Mari leun a c'halloud ha leun a vadelez,
Discouezit ez oc'h bepred ar vam a drugarez.

Mam Doue, renit varnomp gand ho mab benniget
Ha bepred an enebour a dec'ho counnaret;
Mam dener, ho pugale gant fizianz a c'hortoz
An eur da vonet ganoc'h da c'hloar ar baradoz.



MEULEUDI SANT CHERON,

PATROM PARREZ QUERRIEN.

Ton : Sanctorum meritis.

Tostait oll, Kerrieniz, ha canit a galon
Evit meuli ganen ho patrom, Sant Cheron;
Dirag ho taoulagad e likin he vuez
Evel mellezour a furnez.

Pa varvaz he gerend, he zanzev e verzaz
Hag ar priz anezo d'ar beorien e roaz;
Pell diouz trouz ar bed e claskaz goude-zo
Madou caer evid an ene.

Caret en divize beva dizanavet,
Mez re zantel e oa evid en em guzet;
Euz he log e redaz c'honez vad he zantelez
Dre bep corn ar rouantelez.

Hep credi kemeret an urz caer a velec,
Evel avieler ez eaz da brezeg;
Eur frouez burzuduz he gomzou a zougaz
E kement lec'h ma prezegaz.

Bemdez, en eur gerzet gand hend ar binijen,
Pell-oc'h-pell ez ee da glas ar bec'herien;
Caret en divize prezeg d'an oll bobliou
Lezen gaer roue an envou.

Kemeret a reaz d'he zicour da brezeg
Un nebeud diskibien, tud santel ha gouiziec;
Ganto e c'hoanteaz mond d'ar ger a Baris
Evit cresski gloar an iliz.

Mez eur vanden laeron, teir leo diouz Chartrez,
O tonet da c'houlen ar ialc'h pe ar vuez,
Ar zant d'he ziskibien a laraz ker buan:
Tec'hit, va lezit va-unan.

Al laeron a grede penoz an den santel
A zouge kalz arc'hant pe aour leiz he c'hodel;
Pa velzont e oa paour, varnezan e saillzont
Hag hep truez hen dibennzont.

He ziskibien zantel, tec'het en eur vouela
A zeuaz var he c'hiz evid he zebelia;
Evidan e rezont eur be var eur menez
E kichen ar ger a Chartrez.

Bemdez pirc'hirined a rea pedennou
Var he ve brudet-braz dre galz a vurzudou
Hag eno un iliz e lekezont ober
Evit enori ar merzer.

Kerzit oll, Kerrieniz, var roudou Sant Cheron
Evid ma talvo d'oc'h en envou eur mignon;
Evid he vignonet hiken n'hoc'h anzañfe
Ma na zentfec'h ket ouz Doue.

Ne lavarar ket d'oc'h e renkit evel dan
En em zizoher oll euz madon ar bed-man;
Mez hervez ho calloud roit an aluzen,
Rag ho parner her gourc'hemen.

An oll na dileont ket pellaat diouz ho zud,
Mez divoal ne hentint ar re o deuz goall vrud;

Dre scu'er ar bec'herien e lak' an drouc-spered
Calz tud da goueza er pec'hed.

Hep monet da brezeg evel tud a iliz,
En ho ker a dleit lavaret catekiz
Ha cass ho pugale da ziski ar furnez
Dirac cador ar virionez.

Carget ez oc'h ivez euz ho servicherien :
Grit ma vevint eta evel guir gristenien.
D'ar vugaligou haour a jom en ho carter
Deskit lezen gaer ho Zalver.

Renit oll, va breudeur, eur vuez ker zantel
Ma viot e pep lec'h evel guir ebestel :
Scu'er ar gristenien vad ker coulz hag ho c'homzou
A zoug frouez er c'halonou.

PEDEN.

Sant Cheron benniget, c'houi patrom hor parrez,
Grit ma 'z aimp evelloc'h gand hend ar zantelez ;
Deiz ha noz da Zoue kinnigit pedennou
Evit m'hoc'h heuliimp en envou.

